


Feiz·ha·Breiz



C'HOUEVRER 1927



**Gand ar brezoneg eus ar vro
Feiz hag onestiz a yelo.**

FEIZ HA BREIZ



EO

KOSA
KAERA

HA MARC'HADMATA

KANNAD MIZIEK SKEUDENNET

A C'HELL KAOUT

AR VRETONED

FEIZ HA BREIZ a gav dor ziĝer e hement
ti kristen e vez komzet ennan brezoneg.

Er bloaz 1926

FEIZ HA BREIZ EN DEUS EMBANNET :

Sklerijenn war Vreiz, gant E. ar Moal.
Kentellou d'ar Merc'hed, gant Tintin Anna.
Prezennou, gant J. Bulcon, J. M. Breurec, P. Thomas.
Kelennadurez kristen, gant an A. n Eskob A. Duparc, Y. Uguen, Ronan ar C'horr.
Istor Breiz ha Buhezioù tud vras a Vreiz, gant G. P., J. Bulcon, Anna Sevellec, Y. M. Cosdou, F. Mevellec,
Y. Uguen, Y. V. Perrot.
Enklaskou ha Kenstrivadegoù, gant Ch. Lemarié, J. A. Mary, L. Bleuven, L. ar Goff, Yann ar Dantec, Jakez Dourmap,
Anna Youenou, Hervé ar Bras, Marc'harid Gourlaouen.
Keleier, gant J. Kerrien, Y. Brochen, Y. Perquis, P. Guillou.
Peziou-c'hoari, gant Dir-na-dor.
Soniou ha Gwerzioù, gant an Tad 'n Hejgoualc'h, Paotr Treouere, Job ar Bayon, Jak ar Marechal, J. M. Breurec, Yvon
Kerouedan, Kergroaz, Hal-Wyn, Ab-Sulio.
Marvailhou ha Romanchou, gant C.C.C., Mabig Breiz, Breizadig, Melegan, Loeiz ar Floc'h, Dir-na-dor.
Studiadennoù war ar yez ha barnedigeziou war al levrioù nevez, gant F. Vallée, Y. Uguen.
Taolennou ha skeudennou, gant L. ar Guennec, Janed Malivel, Yvon Floc'h, O. Pauvert.

**BRETONED, SKIGNIT FEIZ HA BREIZ en dro d'eoec'h, ha sankit ar wirionez-man donn en ho spered : el lec'h ma vale ar
brezoneg e vale Breiz ; el lec'h ma ne vale ket ken ar brezoneg, livirit ar pezh a geroc'h, eno, ne 'z ens mui, eus
Breiz, nemed ar skeud ha netra ken.**

Setu amañ an dek parrez a zo bet lennet ar muia a FEIZ HA BREIZ enno edoug ar bloaz 1926 :

1 - Sant Pabu 3 - Plougin 5 - Sant Divy 7 - Goulc'han 9 - Lannarvily
2 - Kernilis 4 - Treouergad 6 - Lok-Brevaler 8 - Plougerne 10 - Ar Vourc'h Wepp

Enor d'ar parrezioù-ze a zalc'h, daoust d'ar gwall avel, ker sonn ha ma reont, banniel Feiz ha Breiz en e zav ; enor d'ezo ha trugarez

Er Bloaz 1927

FEIZ HA BREIZ a vezo kalz kaeroc'h c'hoaz; kreski a ralo
eus an hantrez e veit a vezo an hini a voe roet d'ezan pa voe
krouet, er bloaz 1865, hag a vras epad 19 vloaz.
Digor e vezo n'eo ket hepken **D'AR PEVAR BREIZ**, da la-
varet eo da vrezoneg Leon, da hini Tregor, da hini Kerne ha da
hini Gwened, met ivez da hini Bretoned Breiz-Izel o deus ran-
ket deski brezoneg, nann, siouaz, war barlenn o mammou,
met el levrioù daoust da-ze, gwelit a reoc'h, e ouzont en em
denna gantan bras bras, hag hep dale breiz a ouzont en em
glevel eus an eil penn d'egile da Vreiz ha n'o devezo ken
etreuz nemed eur feiz, eur yez, eur galon.

FEIZ HA BREIZ a ralo **TRO VREIZ**, embann a ralo, gant
taolennou dispar, studiadennoù war hon lizou-meur, hor
chapelion, hor c'halvarioù, hon tenzorioù a bep stamm hag a
bep danvez; padra a vezo gantan da ober eul levr evel ma
n'eus ket bet moulet c'hoaz hini ebet ker kaer e brezoneg.
N'eo ket 10 skrivagner eo a skrive ennan er bloaz 1927, met
50, da nebeuta.
Daoust da-ze e vezo ker marc'had mat ha hiskoaz.
Da gemeret en hor moulervez pe en hon tiez-gwerz, diouz
an niverenn, ne gousto nemet 4 real hepken.
Da gemeret, diouz ar bloaz, pa ne gemerer nemed eun ni-
verenn hepken, eo 13 lur ha 10 lur hepken, dre bez, pa gemer-
ver da nebeuta 5 niverenn.

KOUMANANTIT DA FEIZ HA BREIZ
HIZIO KENTOC'H EGET WARCHOAZ

O kus ar priz anezan hag hoc'h adres, dre ar post, d'an
A. Georgelin, 4, rue du Château, Brest, C/G 44.40, Rennes.
Rehavo, lennerien vat ha krenvroz ker, ha bennoz Doue
d'eoec'h.

Plougerne, d'an 8 a viz Kerzu 1926.

Y. V. PERROT,
Rener a Feiz ha Breiz ».

Ma karit ho pro evel ma livirit

LENNIT

SKIGNIT

HĀ MIRIT

Feiz ha Breiz

KANNAD MIZIEK AR VRETONED

Evel an holl draou kaer all,

Henman, evit kosaat, ne gollo tamm ebet e dalvoudegez.

Skridou a gavoec'h ennan ha ne vezont embannet nemet pen-
nad er miz-man, pennad er miz-hont, evel roman nevez ar skri-
vagner brudet Dir-na-Dor,

Dismantr Jerusalem

ha

Tro-Vreiz

Kemerit hen, eta, bep miz, ha goude beza e lennet, mirit hen e
korn hoc'h armel ; divezatoc'h ho pugale vihan o do plijadur ouz e
jenn. Lakit ar re n'hen anavezfent ket c'hoaz d'e gemeret. Da bep
pobl eo lenn hag harpa he yez.

D'eomp ni, eta. Bretoned eo lenn hag harpa hor skridou brezonek.

FEIZ HA BREIZ

KELAOUENN VIZIEK GANT SKEUDEUNNOU
Renet gant Y.-V. PERRIT hag E. AR MOAL

TAOLENN AR MIZ

SULIOU HA GOUELOU MIZ CHOUVEBER

Diskleriadur, E. A. MOAL, p. 23. — I. V. ar Goz Yedel, Y. COGAIN, p. 27. — Tro-Vreiz, Kastele-Paol, G. P., p. 32. — Y.-P. Galloeh, DIB-SA-DOU, p. 37. — Mikael an Nablêz, J. V., p. 38. — Dismant Jerusalem, DIB-SA-DOU, p. 40. — Tri denoz ar Bamps Goultras, G. K. P., p. 42. — Al labour-douar, O'CONNOR, p. 44. — Ar re gloriy ar Medisin, p. 46. — Keleier ar miz, p. 47.

2^a viz Chouveber. — Gouel Itron Varia ar Goulou.
6^a viz Chouveber. — V^o sul goude ar Bonnad; ofereñn ha gousperou ar zul-ze.
13^a viz Chouveber. — Septuagesim; ofereñn ha gousperou ar zul-ze.
20^a viz Chouveber. — Sexagesim; ofereñn ha gousperou ar zul-ze.
27^a viz Chouveber. — Sul an Enez; ofereñn ha gousperou ar zul-ze.

EN EUR GREGI GANT AR BLOAZ NEVEZ DISKLËRIADUR

Ar bloaz nevez, 1927, a zo galvet, diouz ar c'hel-ler a zigouez ganeomp, da rei eul lusk nevez d'ar *Bleuz-Bras* ha d'ar oberoù.
Dija, *Feiz ha Breiz*, o c'henn evel pa vefe eur gelaouenn-all en e lech, o kreski e vent hag o skeudennou, — e briz ivez vel 'just, — a zo deit, en eur gammed, da dizout ar c'haeran kelaouennou a oufed da welout, zoken e Bro-C'hall. Ne gavfed ket trech d'ar peñ ma en em ziskouez d'omp gant niverenn miz gouvez! Gwoz d'an neb a vo dilerchet ha n'he chavo ket ken da bremañ! Blaoveziadur *Feiz ha Breiz*, hizviken, a vo red derc'hel piz war bep niverenn anezo, pe e vezint skrapet diganeoc'h, ken kaer ha ma vezint, ken brao da lenn ivez, ken skouerius!
Met *Feiz ha Breiz*, forz pegen bras ha skeudennet eo deit da vezan, ne hell ket ober an holl labour vrezonek, Elre Treger, Leon, Kerne, e c'heller kontan, a dra zur, ouspenn *kant* kelaouenn e'hallek; hag ez-ein d'ezo, da zerc'hel beo ar brezoneg, eur gelaouenn viziek hepken, *Feiz ha Breiz*!! Gellout a c'hellfed lavaret, penaos ma chomfe beo hon yez, en doare-ze, eo dre vuzard e vefe, evel ma chomfe eur za'c'h goulo en e zav, evel ma tale'he an tan da zevi hep ma vefe dalch'et da deurel koad a-walc'h emañ, evel ma chomfe eun den beo gant diouer a vouet!

Ar vrezoneg e Leon ha Kerne; ar c'helaouennou brezonek o deus grêt o gounid diouz ze... Seul-vui ma vo miret lennerien d'ar brezoneg, dre gazetennou sunveziek, e'ch en em gavo, — ma n'eo ket raktal, diwezatoch, da vilann, — lennerien nevez d'ar c'helaouennou miziek, Ar peñ 'zo red, n'eo ket hepken pedi an dud, e galleg, da lenn brezoneg, met rei d'ezo ivez brezoneg da lenn, rak eur wech digustumet da vat, dilusk eo ha pounius o lakaat da ad-krig.
Setu miret ar gazetenn poblus, a zigouez bep sizun hag a ginnig brezoneg hepken. Ma krog houn-nez, ar c'helaouennou o devo hent grêt da zont war he lech, ha hent frank.
Asoch eo, me gred, lakaat da lenn brezoneg gouziek eur Breton bet boazet diouz eur gazetenn vrezonek, eget ne vefe lien ober mear en dije paouezet krenn, hag e pep doare, da zarempredi e vez skrivet, ma en dije en em droet ouz ar galleg.
Eur gazetenn vrezonek poblus, forz e pe rampeyez e vo skrivet, gant ma ne vezo ket re zalc'het gant giz pep ramvro, a zo galvet da ober, en traon, eul labour ken talvoudus hag an hini a zo grêt, e krec'h, gant ar vrezonegerien gouziek: miret a ra ouz ar yez da dech'et kwit, teurel a ra en tñ ken-neud, hini hag a grego, ha hini founnus a-walc'h dre ma vez pouzaset bep sizun.

Met e Breiz ez eus diou lodenn. Evel ma skriv d'an eur mignon, red eo sellet outo o-diou.
L'idée d'un journal en langue bretonne est excellente. Ce journal sera parfait. Malheureusement, il n'atteindra pas la Haute-Bretagne; or, vous ne pouvez vous imaginer combien l'idée bretonne est vivace dans nos pays de langue fran-

LEVRDI AR GOAZIOU
Montroulez ha Quimper

Al « LAROUSSE AGRICOLE » a zo daou levr bras
haga zo deet o c'haout e pep tiegezh, war ar miz,
en deiz a lizio

Kaout a raez emeo, renket, dra lierenn, sklerijenn war gemet
tra a zell ouz al labour-douar.

1780 pajenn (ment 32x25) a zo emeo; 2800 pennad skrid;
2400 skizmañ; 40 taolenn a lizo; 182 taolenn e dia.

An daou levr, eur golo kalet warno,
a zo 295 lura.

Petra gaver el « Larousse agricole »
Setu annez eus diverra dister hag ho lakado da welet ar c'hleuz
eus ar peñ a zo emañ.

AL LABOUR-DOUAR. — An douaron, penaos o gwellaat; an
toll, al lizo, an hojous, an sal, an gwallo-douar hag all.

AL LIORZOU. — Al legumachou, ar gwez frouez, ar kleunioù
hag all.

AL LABOURIOU WARDIO AN TI. — Al laez hag an amann;
ar gouez; ar chit; ar vilioez hag all.

AR CHATALERIEZ. — Ar yer; penaos o maga ha penaos gwel-
laat o gouarnou; ar gwella gouarnou krazeg hag ar gwella gouarnou
sant; ar gwanernez.

AL LOUAOERIEZ. — Klevijou al lodad hag an doare d'o
louarni ha d'o faren. Al lodad a ra gann war ar miz.

TRAOU MAT DA CHOZOUT. — Penaos munala, douza ha
dize'ha eun dachenn, penaos sevel tiez ha klevijou d'an
dud ha d'al lodad.

BENVICHOU. — Benvic'hioù dre dan hag all.

GNIVIOU AL LABOURER DOUAR. — Al lezenn a zell ar
munia ouz an dud diwar ar miz.

GOULENN. — *enit netra e no laez d'eo'ch.* — EUR BAP-
PENN, EUR SKOUBER EUS AR PEZ MA VO AL LEVRI, eur Leor-
di ar Goaziou, rue St-François, Quimper, pe J. Place Emile-Sou-
vestre, Morlaix.

TOALIT EVEZ MAT I
N'annouac'hait ket
pedaos an **DILHAJOU**
evit GOAZED, PAOTRED YAOÜANK ha BUGALE
ar re Wella, ar re Gwella-Marc'had
a vez gwerzet :-

Aux ELEGANTS

80, ru Siam, BREST (Gwechall ti LIVENAIS)

Ti a fuzians ha brudet mat

EUN DISKEN-BRIZ a 7 % a vez roet d'ar Familhou niverus ha d'ar
zoudarded ma'c'hant er brezel

GARAGE CENTRAL
DU RUSQUEC et C^o
17, Straed Jean Jaurès, BREST — Teleph. 0-51

Gouezerien ar merkou:
DONNET-ZEDEL - DELAGE
CHENARD-WALKER - ROCHET-SCHNEIDER

II CV ha 7 CV DONNET-ZEDEL
a c'heller gwelad ha gann raktal er stal

Stock Michelin
Labouradeg stummet eus ar gwella evid soza mat ha lunan an
holl giri dre dan
Ar c'hirri chomet a-ouch war an hent a vez distac'het ganeomp
war ar zul hag ar gouzenn

Ti kos **L'OLLIEROU** - L'Hostis et Jorde, deut war e lech
18, 27, Straed Leuz-Pasteur - BREST A. S. 1642

Pa ho pezo eun dra lennak da brema, dalchit son ez eo en bon ti e
lavoc'h 40 ar mun da just hag an treou nevez a mouchoueroù ha la-
vachou brodet.

Seiz, mear ha doare a bep saer.

Dioc'h doare ar vachoudoare an tuman a wez gwelloc'h-marc'had
egit d'eur fore petiti hali.

Eun eskamp a gann real dre gant a vez roet a marc'hadouez ha dek dre gant
d'ar familhou niverus.

AU TIGRE ROYAL
FOULINENNOU HA KRECHIN
BREST - 37, Straed Siam, 97 - BREST B.L.S.

EUN DIGAB BRAS A FOULINENNOU A BEB ORIN

AN TIGRE ROYAL, AN ADAL, EVIT BEP FEIZ DEBET

Prema a reer ar kiz krech lenn, kannel-d'ouar, gored, koulmet, gudad-
kad, hag hali, ha paot e vezint pizhou mat.

Toennou SPECK en «EVERITE»
grêt gant simant hag amiant, na dreuz ket an doar anezo, a vir
ouz ar riss kuzik hag ouz an doar.

PEURBADUS
E pladennou a bep ment, betek 5^o 80. Es ha prim da staga, forz
gant plon. — Teuler eves ouz ar marc'hadouez grêt hevel. —
Gouarn 2400 premier, en o sozaez *Poids et chaussette, Marine Na-
vonne, Poudre de Moulin-Bleuc, saine des Produits chimiques,*
etc. bet servijet en doare ar gwella.

E gwez e Ti **SPECK**, 46, rue Jean Jaurès - BREST
(Gwechall ru Pariz, es-tañ d'ar ru Victor-Hugo)

Gwerer an «EVERITE» vit Breiz

Ti Speck a zo da chozañt en deuz ivez o gwez

Kement 'zo ezomm 'vit sevel lojeiz:
Koad an Nerd' heil - machouez; 2; raz simant, pladennou e 10 l
a bep ment hag ha bep hec, betek 3^o 65, Kartons goudronet a c'hell
ment betek 10 vloaz. — Lival a bep liou, e honstou o poueza stiz
2 ha 10 ltr, etc.

Koadach, emmennerach, dorjous, premechou, etc., grêt diwar
vuzal.

SPECK a zav ivez tiez marc'had mat
e meta pe e wul e machouez, a zo lizo.

Stalcioù Nevezioù Bras
Aux Galeries Saint-Martin

KOANTA NEVEZIOU
GWELLA PRIZIOU

Gwiskamanchou graet war vuzal evit gwazed
Daou gemener mat-re

DREIST EVID AR MEZERACH DU HAG A LIOU
Evit an dud diwar ar maez

Klevijou ar Gwad hag ar C'hroc'henn

Emeo, pariz, soza, d'ouar, gant holl produet d'ar Breston Tre-maez, ar servis leun
a servis.

Klevijou Kan an Troaz, pariz d'ar an Troaz (edemad)

Prederiet e vez douar-ar-mammou, kolloù gwenn, diwad,
Brech'hou ha Serum, Hôlen Radium

D. P. TESSONNIÈRE
50, Straed Algotillon - BREST. Treuzgouez 47-1

Stal-labour karonserez, Dibrez ha liverez
R. C. Brest 2529

Ti **Frédéric LAURENT**
23, 25, 27, Straed an Tour d'Auvergne - LANDERNE

An itron intañvez **LAURENT** war e lech
Dreist evid ar gwevriou skau war rojou kelec'hiet-
gom, Road'Caris ha frotterezed, kirit-saov, gardou,
Rojou kelec'hiet-gom a bep saer. Ar Rojou kelec'hiet-houarn
a vez lakaet ganeomp da rojou kelec'hiet-gom.

çaise. Il me semble que le Bleun-Brug ne devrait pas se cantonner dans les étroites limites de la langue, car ce serait amoindrir le mouvement breton, au détriment des départements où l'esprit est le meilleur, les études historiques et linguistiques les plus développées, et dont l'un comprend même la capitale de la nation bretonne. Quand nous-nous, chez nous, un organe unique semant la bonne semence et entretenant la flamme sacrée chez tous les Bretons sans exception, organe bilingue ?... »

Me a oar da biou, dreist-holl, e reio plijadur ar c'homzouze skrivet gant unan eus pennou-bras an emzao brezonek; met pell emaint ivez diouz ober displejadur d'in; anez n'am bije ket o moulet aman.

Esaet hon eus bet ha dilezet eo bet ganeomp ar gazetenn diouzeziek, ahalamour n'eo eun dra vat hepken evid eun amzer hag abalamour ma ne vo ket, goude ugent viavez labour, miret ouz ar brezoneg ken da vont da get gant galleg ha brezoneg kenver-ouz-kenver, met gant brezoneg e-unan. Red eo d'eomp kaout kalon a-walc'h, evel m'en doa bet an O. Vallée gwechall, — hag ez eus pell zo abaoe! — da lakat ar Vretoned dirak o yez hec-man-penn. Evidon,

Kazetenn diou-yeziek,
Kazetenn vezek.

A-du gant eur gelouenn vrezonek penn-dabenn, ra lakin aman c'hoaz eul lizer digaset d'in gant eur misioner hag a anavez mat, hag abaoe pell zo, doare ar yez e Treger, Goelo, Kerne:

« Breman, pa 'm eus lennet ho kabadenn, (brezoneg ha galleg), ec'h intentan kalz gwelloc'h ho loure hag e laran d'ac'h, gant muioc'h a nerz-kalon, bala war rök gant ho menoz. Kaout a refet tud da vale a-gored ganac'h. Paot bras eo d'imp mont eulse; a-dal, rak koad-han ra ar brezoneg en eun doare euzes en hon zouez, ha ni, misionerien, ne reomp nemet harz an dud da ankont muioc'h-mui yez o zad koz.

Balet eta hep skizvan, rak ezomm a zo da zi-c'hourdan an dud! »

War-ze, hon doa goulnet c'hoaz alioù all ha, d'ar fin, e oamp et betek Ao. 'n Eskob Sant-Brieg. Selu ar respont en deus bet ar vadelez da zige-menn d'eomp:

EVÊCHÉ
DE
SAINT-BRIEUC ET TRÉGUIER

Saint-Brieuc, le 29 décembre 1926.

CHEZ MONSIEUR LE PRÉSIDENT.

Ainsi que j'ai eu le plaisir de vous le dire, rien ne pouvait m'être plus agréable que la nouvelle que vous venez, lundi dernier, m'annoncer, en com-

pagne de Monsieur l'abbé Brochen, de la fondation prochaine d'un hebdomadaire en langue bretonne.

Vous comblez un désir que j'ai cent fois entendu exprimer et qui était très vif, un peu partout, dans les arrondissements où l'on est resté fidèle à la langue des pères.

Votre programme est parfaitement compris et la liste des collaborateurs, dont nous avez bien voulu me donner les noms, est une garantie qu'il sera rempli à merveille.

Aussi, de tout cœur, je bénis « BREIZ » et lui souhaite longue vie et plein succès, et de tout cœur aussi, j'étends cette bénédiction à tous les bons ouvriers qui, avec vous, se dévoueront à cette feuille pour la défense des idées chrétiennes et la conservation de la langue et de toutes les saines traditions bretonnes.

Avec toute ma reconnaissance, veuillez agréer, cher Monsieur le Président, l'assurance de mes plus respectueux et dévoués sentiments.

† FRANÇOIS-JEAN-MARIE.

Evêque de Saint-Brieuc et Tréguier.

♦♦

Pesort kelemdadurez da dennan eus an tri lizer-ze? Ha n'eo ket houman eo: Hon deus ezomm, e Breiz, eus diou gazetenn, gant ar Feiz ha Breiz, da vodan Breiz-Izeliz ha Breiz-Uheliz ampant war ar yez?

Ha n'eo ket houman c'hoaz: Fo dleet d'ar che-louennouze dibab pep hini he zalc'henn ha labourat warni, gant evez na noazfent, re en holl an eil ouz eben?

Ha houman adarre: E tle holl vignoned ar Feiz hag ar Vro ober le, e penn ar bloaz-man, e roint doun. DA GENTAN, D'O CHAZETENNOU INT, da lavaret eo, d'ar re 'zo krouet EN O ZOUEZ, EVITO HA NANN EVIT TUD ALL; ma roint doun d'ezo eta

dre o c'houmananchou,
dre o skridou,
dre an embann a raint evito.


An disklériadur-man a oa dleet d'hon mignoned ha kenlabourerien, en eur m'eman tud ar Bleun-Brug o kroui, evit difenn Breiz, — klozan ar c'helc'h endro d'ez, — eur gazetenn vrezonek hag eur gazetenn c'hallek.

Evit ma ne vo kavet abeg e nikun, ar gazetenn vrezonek a gemero lec'h Arvorig, ha neira ken. Goude frugarekat lennerien goz Arvorig, o fedan kalonek da vezan feal d'ar gazetenn, « Breiz » a zav diwar an hevelep gwrizienn gant Arvorig, gwrizienn ar Feiz hag ar Vro.

E.-A. MOAL.



ITRON VARIA AR GOZ-YEODET e parrouz Pleulec'h



Chapel Itron Varia ar Yeodet

Salve sancta parens, enixa puer-
pera regem.

Hon bro Breiz-Izel, meur a wech hon eus hen skrivet aman, a zo bet gret gant ar Zent: hag ar feiz kristen a zo gwirnet ken doue e kalon ar Vretoned ma weler anez e chom hirie c'hoaz hiridik da divrall daoust d'ar re a laka o holl jijn d'he diskar ha d'he laza agrenn.

Laret d'in, eme eur zant, ha karout a rer ar Were'hez en eur vro ha me a laro d'ec'h ha kristen eo ar vro-ze.

Ha pelec'h muioc'h evit e Breiz eo enoret Mari? Pelec'h ez eus savet en hec'h enor muioc'h a illoz, muioc'h a chapelou, muioc'h a skouennou, muioc'h a feunteunioù? Pelec'h e tieder gant muioc'h a brez d'he fardoniou brudet! Pelec'h e klevet ar gristenien o laret, o kanan, o youc'hal ar gomz dispar kutuilhet breman a zo

peup kant vla war vuzelloù ar foll Salaün ha skrivet goude en lizerennou aour war al lilienn diwanet war e vez dister e kreiz eur c'hoad didrous: Ave Maria!...

Alles e weler skrivet penos Bro-Chall a zo rouantelez Mari « *Regnum Galliae regnum Marie*. » Evidon me a skriv ive, heb aon da fazia, penos ez eo ken gwir all al lavar-man henvel: « *Regnum Britanniae, regnum Mariae*. » : « Rouantelez Breiz-Izel a zo rouantelez Mari.

♦♦

Ar Vretoned koz a gare kement ar Were'hez, m'o deus klasket, evit o rei d'ez, an anioù kaeran a onfed da gaut. Eul levr a bez a vefe ezomm evit komz eun nebeudig eus pep hini aneze.

Unan eus an anioù-ze hag e tigas goul an Nefeleg sonj d'imp anez n'eo ket anavezet nemeur hirie gant kalz a Vreiziz: Itron Varia ar Yeodet.

Ar ger « Yeodet » a zo eur ger brezonek penn da henn. Deuet eo eus ar ger « Gwillioudan » gret anezan goude « Gwillioudan » « lakat er bed »; ar ger « Gwillioudet » pe « gwilloudet » « a lar » hag he deus lakat er bed, « e latin » parta, enixa.

Itron Varia ar Yeodet a zo eta « Itron Varia ar Were'hez Mamm. »



Pebez ano dispar! Ano diskennet eus an nenvou, ano hag a zo, bep wech m'hel larer, eun akt a feiz en Holl C'hallaoudek, ano hag ec'h anzave dreizan hon tud koz unan eus brassan burzudou en deus gret Doue en kenver eur grouadurez: beza Mamm ha Gwerchez war eun dro.

Nag eo frealzus evidomp, en eun de hag e klasker kement a hep tu distruja kement a digas da sonj eus an Otro Doue hag eus E C'hallaou, kaout testentou evel hennez eus feiz krenn hon tadou hag a oa — piou a greffe laret ar c'hontrol? — ken speredek ha ni...

✻

Ar Yeodet a zo eul lec'h douius ha n'eo ket hep abeg en deus skrivet an Otro Moal en e levr Buez ar Zant ar c'homzou-man ken meulodius: « Ar pirc'hirin a bleustr evit ar wech kentan douar zantel ar Goz Yeodet a vel eno unan eus ar c'haeran tolennoù a oufe Breiz lzel dispakan dirak e zaoulagad.

Ne oar da gentan ouz petra sellet pe ouz ar mor bras kompez, henvel ouz eur vantel c'hlis divent, eur voulouzenn wenn war he zro ha steredennou arc'hant o lintran a vileroù war he gorre, pe ouz an douar, kosan lamm, marteze, en Breiz bet pleustret gant kristenien.

Kalz a skrivagnerien o deus skrivet diwar-benn ar Yeodet pennadou hirr hirr met alies avat tenval tenval elec'h ne weler en neb lec'h eur herad sklerijen.

Darn a lar e oa eno gwechall, war ar gourenezenn vihan a welomp bepred hirre, eur ger, hec'h ano Le-xohi, bet savet gant ar C'hallaoued koz ha bet kement da c'houde gant ar Romaned. Ar re nuan a lar e toug al lec'h-ze an ano a Goz-Yeodet o vean m'edo eur « vetus civitas » pe « cioutas » da laret eo « Ker goz ».

Darn all, hag ar re man ez afen kentoc'h a du gante o deus skrivet e oa er Yeodet gwechall arok Landreger penn-ker eskopi ar vro.

An eskob kentan a voe, er bla 69, an den Zant Drenaluz, diskijh unan eus ar re a diskennas Jesus diwar ar groaz, Joseph Arimat. Drenaluz goude meur a vlavez labour a deus a benn da lakat brazuna falz doueou ar baganed hag a lakeas sevel er vro eun iliz ha kroazfou...

Tast da henn kant via goude, sant Tual a voe ive eskob ar « Goz-Yeodet ». Douaret da gentan e kichen Brest ha savet eno gantan manati Trebabu, Tual a deus goude da vro an Domnone elec'h e oa roue eur c'henderv d'ezan, ar prins kristen Derok.

A-uz traoennenn Trekor e savas eur manati neve elec'h e vevas, sioul ha didrous, en dro d'e venech'k karek betek an de ma voe hanvet eskob er vro. Neuze e ias d'ar Goz-Yeodet, endro da c'houec'h leo ac'hane dre an douar, met kalz tostoc'h dre vor...

Ar Yeodet a c'houmas penn-ker an eskopi betek ar bla 850. D'ar peent-ze e tenas an Normaned hag ar Zozon d'he distruj evel da distruj kalz a tec'hioù all dibabet gant ar Vretoned e kichen ar mor evit bevan enne. An eskob a ias neuze da chom da Landreger elec'h e vevas betek ar bla 1790. Er bla 1802, eskopi Treger a voe staget eus hini Sant-Brieg hag an eskob dibezet, an Otro « Le Mintier » a ias da Londrez er bla 1791 hag a varvas eno er bla 1801.

✻

Pe tra a ra kredi eo bet ar Goz-Yeodet chomlec'h eskibien ar vro. Eun dra a zo anat. Er Yeodet ez eus chomet roude a bep seurt: mogereunou koz, feunteunioù holzet kaer, eun hent ha n'hallfe den laret

an oad en deus... Ouspenn, ar Yeodet a zo eul lec'h brao da zifenn, gant mor ha traoennou tro-dro, hag an hent-ze hon deus komzet anean, o staga anezi ouz an douar bras.

A dra zur eta ar Yeodet he deus bet er vro eun dalvoudegez vras. Hirre ne larer ken e oa eno ar ger Le-xohi. Evidon-me a gred kement ar gomz laret gant eur skrivagner bennag hag a lak anezi pell ac'hane:

« Lexoviensium urbem in pago Neustriis sitam... »
 « Er c'hontrol n'hon deus digatez ebet da lezel a goste ar gredenn o deus bevet eno kentan eskibien kornbro Lanuon ha Landreger... Ar pez avat ez eo ar gwellañ evidomp ober ez eo lezel an dud a ouziegezh da enklask diwar-benn amzer goz hon bro. Ni pa welimp e c'hall'o lavarioù beza reiz ha gwir, a vezo prest bepred da laret » ya » war o lereh gant ar brassan doujans.

✻

En de a hirre ne chom eus ar Yeodet nemet eun tokadig tiez bodet endro d'eur chapelig koant savet en enor d'ar Werc'hez-Mamm. Ar chapel a zo gwintet war eur greehen e weler diwarni ar mor oc'h en eun ledan ker pell ha ma c'hall an daoulagad gwele... hag ac'hane ive, pa vez sklear an amzer, e weler an tour a zo enor Bro Leon: tour Itron Varia Kreizker...

An darnvuian eus potred ar Yeodet a zo martoloded... Holl e karont dreist pep tra « ho ». Gwerchez koz... ha zoken, marteze an Otro Doue ne zeu eno nemet warlerc'h unan eus e grouadurioù... Ne gredan ket kouskoude ne garfe ket, Hen ive, ar vartoloded-ze hag o deus en « Mamm e Vab » eur fe eus ar c'hrenvan hag eviti eur garante tener. Ha neuze, bepred e chom gwir, na petra 'ba, ar gons a lare alies an den c'itrus « Grignon a Vontfort: » Eur gwir servijer da Vari n'ao biken da goll.

Neus ket pell eur vaouez koz a gonte d'in, an dour en he daoulagad, penos he mab, lad a bevar hugel, a voe miret eus ar maro en eur c'houleñ sikour Itron Varia ar Yeodet.

Penos neuze ne garfent ket Mari, ho Itron, ho Mamm? Ar garante a denn ar garante: hag ive karout ar Werc'hez a zo karek Jezuz rak an hent gwellañ da vont betek kalon ar Mab ez eo an hent a dremen dre galon ar Vamm: « Ad Jesum per Mariam ».

✻


Chapel ar Yeodet a zo eta chomet en he sav, kae-roeh evit biskoaz e kreiz an dismantron stalbet endro dezi. Ha beza eman el lec'h e oa ive an iliz koz?
 D'ies eo her gouzout. Adgret eo bet meur a wech: « er bla 1858, eun tiegezh kristen eus ar vro o veza roet prof a-valc'h e voe savet ar chapel a neve ».

En diavez ne 'z eus netra a gaer, netra da vihanan hag a c'hellje lakat chapel ar Yeodet e renk, chapelioù all eus ar vro kizellet ha dantelezet.


En diabaz ez eus miret kement tra gaer a oa er chapel goz. Al lein oter a zo en dero kizellet brao kenan. Er c'hreiz anezan eman ar gwele, eman astennet ennan ar Werc'hez hag, en he c'hichen, ar Mabig Jezus.

Keun hon deus avat o weler bremen war ar gwele elec'h ar palenn koz ken kaer, unan nevez hag en deus kalz nebeutoc'h a dalvoudegez. Eur seurt skeudenn, rouez bremen en Breiz, a diskouez d'imp e leu ar ger « Yeodet » eus ar ger « gwiondan » « lakat er bed » ha mamm eus gerioù all diwanet a damon en spered tud gouiek c'hiant d'e d'ale'hmat da veza deskelec'h evit ar re o deve pleustret en o raok war ar memez tachenn.


Ar pez hen diskouez c'hoaz ez eo ar prez o deus d'ale'hmat lakat ar gristenien, ar mammou dreist-holl, da zond di da bedi ar Werc'hez.



Ar Werc'hez en he gwele gant ar Mabig Jezuz
(doure koz)



Ar Werc'hez en he gwele gant ar Mabig Jezuz
(doure nevez)



Ar Chapel fichet evit miz maé

Breman ez eus daou chant via pe vardo ne oa war boned diou, teir ha peder leo eus ar Yeodet, eun liegez kristen ha ne yaje ket da bardonan da di ar « Vamm-Gwere'hez » koulz pe goulz epad miz maé. Miz maé a zo chomet, er Yeodet, eur miz a bedenn, eur miz a bere'hirinaj. Evid d'ar c'hoaz ha ma oa gret ar chapel neve, e vez kanet breman c'hoaz, goude eun chan hiri, eun oferen-bred, d'an 30 a viz ebrel, da hanter neiz, ha hep sul e vez er chapel, pad ar miz, oferen ha gousperou.

An Otro Savidan, person ar barrouz breman, hag en deus evit e Itron Varia eun doujans divent, en deus gret gwelloc'h c'hoaz: hemde e vez diou, teir, peder oferen ha pemp a-wechou er Goz-Yeodet. Boleien ketonni Lannou a zirel, galvet gant ar pastor karantezus, da ginig er chapel ar zakrifis santel. Int ive daoust ha n'o deus ket meur a drugare da laret d'ar Were'hez, meur a c'houlenn da ober diganti evit ma refont d'ar 500 lugel fiziet enne ar vad a fell d'e ober?...

Me ive an eus bet an euvad da laret er bla man pemp pe c'honec'h gwech an oferen er Yeodet. Hag eun dra deist holl an eus kavel kaer bras. Eur vaotez koz, oajet a 70 via, a sav hemde a-benn pemp eur hanter hag a respont, stonet dalc'hmat war he daoulin e traon ar c'heur, an teir, ar peder pe ar pemp oferen.

Skoner dispar! Daoust ha pedenn ar vaotez koz diannav na vefe ket a-walc'h evit tennan sellou madeleuz Mari war ar chapel vihan, war ar re a bed enni ha war ar re a deu di da c'houlenn o mennad?...

Ar Yeodet a zo bet, a zo c'hoaz hag a deuo da veza muioch mui pepred eul lec'h devot ha darempred gant kristenien Breiz Izel...

Ha n'efont ket d'ar Yeodet evel ma ia, epad an hanv, divroidi a-leiz da welet eun dra goz, eun dra rouez ha ne gaver nemet en eur « muse »...

Mont a refont evit pedi, evit goulenn digant ar Were'hez, o binnigan, binnigan o zad, hag ive, ha dreist holl, binnigan hon bro Breiz evit ma savo skedus a-neve... Er mare-man Normaned a c'hiz neve : hon gizoù, hon gwiskamanchou, hon yez, hon feiz... Itron Varia ar Yeodet, zikourit ac'hanomp!...

Ar mammou a ielo muioch c'hoaz evit an holl dud all da fiziout er Were'hez o bugale yaouank...


O! bugale Breiz Izel! Nag a enebourien a glask hirie laza en o c'halon karante Doue hag ar garante vro...

Mammou kristen bezit war evez!... Goulennit digant Mamm ar bugelig a welit er mare-man en liiz astennet en eur c'hraou, beza war evez a-gevred ganechi!


Mamm eo evelloc'h ha me gred penôs unan eus an anioù a dle plijout d'ez ar muian ez eo an hini a digas d'ez da sonj eus an de cüris e lakeas er bed Mab Doue, hon Zalver Jezuz Krist!...

Itron Varia Yeodet pedit evit Breiz, pedit evit ar Vretoned!...

YANN COCAIGN.



Ar « Yeodet » en de a hirie





TRO VREIZ

II. — Iliz-Veur Kastell-Paol

Kastell
Zantel,

a lavare gwechall ar re goz, ha n'eo ket souez, rak pa weler ker-benn eskopti Leon en he c'haer, eus a Gersaudy, pa vezer o tont eus a Vontroulez, pe eus a Gec'h-Mikael, pa deuer eus a Zanteg, pe diwar veg Karanteg eo henvel ouz eun iliz veur divent a ya eus an eil penn d'egile da ger, hag a zo warni eun hanter dousenn dourin.

Eun dervez, e miz here, e oan o'h en em gaout e Kastell-Paol; an noz a oa o tont; ker goz eskibien Leon a welet he ziez, he ilizou hag he zourioù o tua tamm ha tamm, endra ma taole c'hoaz an heol, a-dre kein, e vannou warnezo, eun dudi o gwelet o treuzi dantelez mein tour Kreisker: kaera taolenn.

Gwechall, e Minitiy sant Paol, — da lavaret eo e parrez Kastell, endra m'oa stag outi c'hoaz Roekoff ha Santeg, — e oa 30 iliz pe chapel dispartit an eil diouz ehen. Onspenn an hanter anezo a zo diskaret gant ivinou an amzer, leziregez ar gristenien ha morzolioù an dispac'herien. A drugarez Doue, ma 'z eus aet meur a dra zantel d'an traon, ar pez a oa a gaera, e Kastell-Paol, an iliz-veur, a zo chomet en he sav: Ez comp da ober eur gwel d'ez.

En amzer m'edo H.-Z. Jezuz-Krist war an douar edo ar Romaned o'h ober o mistri, er vro-man a hanvomp breman Breiz-Izel. Eur c'hastell o devo savet o soudarded el lec'h m'eman breman iliz-veur Kastell-Paol. P'en em gavas e Leon, abostol bras ar vro, Paol Aurelian, wardro hanter ar VIth kantved, ar Romaned a oa tec'het; ar c'hastell koz a oa kouezet en e boull ha loened gouez a oa o chom etouez ar strouez a c'holoc, a-nebeudou, ar mogerioù hanter gouezet. Mestr ar Vro, an tiern Wlaur, a veze o chom, peurliesha, e cnez Vaz pe e Penhoat, a reas digemer mat d'an eskob breizad hag a roas d'ezan noz da jom e Kastell koz ar Romaned. Sant Paol a zistroezas hag a gempennas anezan hag a zavas ennan eur manati hag eun iliz. Pa varvas, wardro ar bloaz 550, e cnez Vaz, e voe digaset e gorf da zebellia da iliz Kastell; an iliz kristen genta-ze savet gant sant Paol a voe diskaret gant an Normaned, wardro ar bloaz 857 ha ne

jom anezi netra nemed eur maen kizellet a zo bet laketa da ober rizenñ uhela moger unan eus chapelioù tu ar c'hreisteiz.

An iliz veur a voe graet pa voe gellet kas an Normaned eus ar vro, a voe savet re en holl diwar zav, ha ne badas ket. E bloaveziou kenta an XIIIth kantved e rankjod staga adarre gant eun iliz nevez. An eskob Derrien eo a lakeas en douar, er bloaz 1237, maen kenta an iliz a weler breman hag a droas anezi, evel m'eman ar c'hiz, an soter e penn ar zav-heol hag an tourioù e penn ar c'huz-heol.

Beskonted Leon a zikouras kalz eskibien Kastell-Paol, da heurgas al labour da bem ha setu perag e voe roet d'ezo evid atao eur skabell, en iliz nevez, etouez re ar chalonied.

Eur marvailh a zo hag a red etouez an dud diwarbenn an tourioù; endra m'edot ouz o sevel an diaoul a oa e Kleder; eur wech graet gantan eno ar pez en doa da ober e falvezas gantan dizrei adarre da Kastell; pa welas an tourioù a oa savet war an iliz nevez ez eus e konnar ruz hag e kemeras eur pez maen da stlepel outo d'o diskar, met ar maen, a drugarez Doue, ne c'hellas ket mont gwall bell hag a gouezas, hep beza graet droug ebet, en eur waremm, e Plougoulin, harp ouz maner koz Poulplancat: roudou ivinou an diaoul a weler c'hoaz warnan.

Wardro ar bloaz 1310 an eskob Gwilhou Ker-sauzon a heurc'has porched ar re a c'hed ar vadiant hag a zavas chapel sant Vazzin el lec'h ma voe scheliet, er bloaz 1337. An eskibien a deus war e lec'h, Gwilhou Rochefort ha Yann Validir, a lakeas bolza ar vali greiz, sevel ar c'heur, ha porched ar c'hreisteiz a voe peurc'haet hepken e bloaveziou diveza ar XVth kantved.


Er XVIth kantved e voe uhelaet leurenn ar c'heur ha laketa ennan ar skebell kaer a weler c'hoaz charz; neuze ivez e voe laketa war an iliz gwer a liou, kresket niver he aoterioù, he skeudennou, he bezioù, he zaolennou. An soter vras, e marbr du, ne voe laketa en iliz nemed er bloaz 1770.

Epad bloaveziou an Dispac'h, iliz-veur Kastell ne voe ket ker gwatalet hag hini Kemper; koulskoude, neuze eo e kollas, koulz lavaret holl he gwer a liou, dre ma oa skouejou warno hag a zisplije d'an Dispac'herien. An douez « *Raison* » a

voe enoret enni azalek an 9 a viz genver 1793, gant tud aet e bellh.

Avel an Dispac'h a gouezas, a drugarez Doue, hag an iliz-veur a voe kempennet a zoure dreist-holl azalek ar bloaz 1840 ha laketa da veza adarre kaer meurbed: siouaz, ma kavase he gened, ne gas ket an hini a rae he buhez: he eskob.

Iliz-veur Kastell-Paol ma n'eo ket ker kaer da welet, en diavéz hag hini Kemper a zo eun dudi sellet outi pa 'z ear en he diabar. He zourioù o deus 50 metr uhelder hag a-zioc'h an nor-dal a zo etrezo ez eus eur pondale e pigne,



Iliz-veur Kastell-Paol

gwechall warnezan, an Aotrou 'n Eskob, d'ar gouelou bras, evit rei e vennoz d'ar bobl. Etre an diou zor e kaver skeudenn sant Paol Aurelian o stolia crochant Enez Vaz.

Porched bras tu ar c'hreisteiz a oa ennan gwechall skeudennou an daouzek abostol. War ar



Diabarz iliz-veur Kastell-Paol

vein gizellet e weler c'hoaz redet ar c'had hag an ouc'h gouez; dre' douez al loened-ze e weler errountet askellou hag eur pinsin dour benniget warnezan skoued aotronek Lok-Melar, e Gwint-venter.

Pa 'z aer en iliz, dre an nor-dal, a zo etre an touriou ez aer dre zindan kampir an ogrou a zo bet savet er XVII^{me} kantved; gant an eskob Herri Laval de Boisdauphin; chom a ra stag an daoulagad, da zellet ouz ar vali greiz a zo ker splann gant he fi-hieri mein kaen, a lavarfed a vefe uhel mantrus daoust ma n'o deus nemet c'houezek melr. Evid anout pinvidigezou iliz sant Paol groomp an dro d'ez en eur staga da genta diouz an tu dehou.

Kaout a reomp dioc'h, dindan an tour, a zo e tu ar c'hreisteiz, evel e Kemper, chapel an dud Ior. Mont a c'hellent enni dre eun nor graet evito hepen hag en hent-se n'o devoa ket a ezomm d'en em douezia gant an dud all.

Pelloc'hik e kaver eur maen bez, bet kizellet en XII^{me} kantved; Kemeret eo bet epad pell amzer evit bez Konan Meriadeg, kenta roue Breiz, met pa oar deut da c'houzout n'o devoa bet hiskoaz ar Vretoned roue ebet eus an ano-ze, e oar deut da gredi e c'helle beza maen-bez eun eskob hag a oa Konan e ano.

E chapel sant Varzin eman ar maen font. Eno e kichen, war dok eur pilier, e weler, kizellet brao

eur c'had hag eur c'havrig oc'h en em ganna ha war begel eur volz eun crochant o chaoket e lost. Eno ez eus eur prenestr gant gwer a lion koz taolennet warno an Oberou a drugareg gant skouejou aotronek Kerenec, e Kastell-Paol.

P'en em gaver e chapel-kroaz ar c'hreisteiz, e chomer sebezet da zellet ouz rozenn gaer ar prenestr bras a zo bet graet he gwer gant an A. Lo-hin, eus a Dours hag e kaver enni, hervez an Aotrou Abgrall e kaera taolenn war wer a zo bet livet e Breiz.

Chapel ar Galon Zakr a zo enni teir dnoelenn a dalvoudege; er mogeriou, dindan gwaregeier godek, e kaver beziou aes gouzont beziou piou int diouz ar skouejou a zo warno; hez emma hini ar chaloni Jerom Tredern, ginidik eus a Blougoulim; re aotronek Kersaouan, eus a Wielan ha Kerrom eus a Gastell; hini Mac'harril Brehand, itron Kerouze, maro er bloaz 1713. Hounnez an itron-ze, eo, eun dervez ma weler ez ae keuneud, eus he c'houjou, gant al laer, e lec'h mont da glask an arche-rien, a c'houlennas ouz eskob Kastell digas d'ez eur chaloni hag en divije aotre da eskumungi al laeron.

E kichen ar c'heur, ez eus eur prenestr gant gwer hag a zo bet livet er XVI^{me} kantved ha dindan, hez Herri ar Scanff, aotrou Kerogat, e Gwec'h, hag a oa senechal Leon, er bloaz 1500; eur skrid latin a zo warnan, ar c'hentelou-man ennan: « N'eus fors piou out, evel dom e varvi; chom a-zav, sell ha gouel; me a zo ar pez ma vezi; eur neutadig luda. Ped evidoun, en han Doue; krignet oun aman gant ar preneved; evelse e tremen gloar ar bed ha kement den galloudus a zo, a en em gavo gantan ar pez a zo en em gavel ganen! »


War begel bolziou ar c'horn-ze eus an iliz e kaver skouejou an Aotronek o deus roet profou d'o sevel; anaout a raer skoued ar Bluskelleien, aotronek Maille, e Gwinevez, re ar Barbiered, markized Keryann, e sant Nonga, re ar Richarded, aotronek Pont-ar-C'hastell, e Plouider, re ar Chavi-gmeed, eus ar Maine, a zo bet daou anezo eskibi- en eus a Leon, eus ar bloaz 1521 d'ar bloaz 1562. Uhe- loe'h, e chapel sant Roch e kaver skouejou aotronek Kerrom, aotronek Kerlivry e Kleder ha re ar Gerneevez, e Kastell- Paol. Eno e kaver taolenn ar Rouaned o tont da welet ar Mabig Jezuz; livet eo bet war goad er XVI^{me} kantved; ar c'hempenna a zo bet klasket ober d'ez, a-nevez zo, ne d'ev ket kalz a dra. Ar c'horn-ze eus an iliz-veur a zo tenval. Ouz speurenn ar c'heur e kaver aoteriou maen ha war unan anezo skeudenn an Itron Varia a Druet.



Skudennou an Dreinded

Pelloc'h e kaver chapel santez Anna, hini sant Paol pe I. V. ar Seiz Glac'har, gant daou 'vez,

e weler, war ar gwaregeier zo a-uz d'ez, skouejou Herri an Nevet hag e bried Isabel Gerc'hoent e Kastell-Paol, dimezet er bloaz 1452. War heur an iliz e weler maen-bez eur chaloni, Fransez ar Vayer, eus a vaner Kerimel e Kastell-Paol. War ar volz eo livet taolenn an Dreinded: tri benn, tal ouz tal, o deus o zri tri tri, teir c'henou, teir elgez ha n'o deus d'ezou nemet tri lagad; war ar seizzennoù a zo tro-war-dro e lenner: *Ma Doue hag ar ger Arabat* skrivet c'houe'h gwech dioc'h-



Rozenn prenestr bras tu ar c'hreisteiz


tu. Ar ger-ze a ranke beza ger Hamoned Penanru, e weler o skoued war begel ar volz tosta. Eun daolenn vras graet e bloaveziou kenta an XVIII^{me} kantved a ziskouez sant Paol o stlepel an crochant er mor.

Ouz speurenn ar c'heur e kaver tri bez eskob, hini Gwillou Kersaouan, a varvas er bloaz 1237 goude beza savet chapel sant Varzin, a zo bet graet en XIX^{me} kantved, met laket eo bet warnan, ger evit ger, skrid bez an XIII^{me} kantved. An eil bez, bet renket a-nevez goude an Dispac'h, eo hini Rolland Neufville a voe eskob Leon epad hanter kant vloaz, adalek ar bloaz 1562 betek ar bloaz 1613; miret a eure ouz fals lavarou Kalvin, d'en em zila en e eskopi ha skigna a eure, dre an holl barreziou, an devosion da Jezuz-Krist, meulet ra vezo, e Sakramant an Aoter. An trede eo hini an eskob Fransez Visdelou, maro er bloaz 1671; eul labour kaer eo, kizellet e marbr gwenn, er bloaz

1711, gant Nicolas de la Colonge. Skouejou ar bez a zo bet torret, d'an Dispac'h, hag o veza ma oa eur skouedig bihan war walenn an eskob kez, evid e lennell eo bet torret d'ezan, war eun dro, e walenn hag e viz. Begel bolz ar chapel-ze a zo warnan skoued ar Rioulzien, aotronek Kerangouez e Kastell-Paol; o bez a zo dindan ar prenestr; warnan e weler Renan Rieux, eskob Leon, o tont, a-nevez, da azeza war e gador eskob, hen hag a oa bet harluet, eur pennad.

Ar chapel a zo a-dre kein an aoter vras eo chapel sant Joseph; en tu dehou enni e kaver bez ar chaloni Olier Richard, kuzulier e Parlament Breiz (4), maro er bloaz 1534; e vreur Fransez, — a weler e vez hremen e iliz Plouvinan, gwechall edo e chapel Tariec, — eo a lakeus sevel ar bez-ze d'ezan. E chapel sant Joseph ivez ez eus eur maen da zer- c'hel ano an A. Coetlosquet, eskob Limoj, goude beza bet kelennet tri roue, Loeiz XVI, Loeiz XVIII ha Charlez X maro e Pariz er bloaz 1784. Gant e oa bet e maner Kerigou harp e Kastell. Eur maen all a zo eno o c'helal kalon an A. Leopold a Lezelec, eskob Autun, maro er bloaz 1873 ha ginidik ivez eus a Gastell.

Dirag ar chapel-ze, harp ouz speurenn ar c'heur, eman bez diveza eskob Kastell-Paol, an Aotrou Yann-Fransez de la Marche, eur breizad ginidik eus a Ergue-Gaberic, e kichen Kemper, montobour bras eskopi Leon, maro, en harlu, e Londrez, er bloaz 1806. Digaset eo bet e relegou da Gastell-Paol, er bloaz 1868. Skeudennet eo bet, gant ar c'hizeller Cugnot, daoulinet war e vez, en e zourn al lizer a skrivas eus a Londrez da zispac'herien Kemper: « *Faites tomber les fers de mes pretres prisonniers et je m'engage à traverser les mers pour aller me remettre à votre discrétion.* »



(1) E di a zo c'hoaz en e rav e Kastell-Paol, evel n'hen dis- ouez ar skoudenn-man.

O kendele'her da ober an dro e kaver bez an eskob Reman Rieux, maro er Releg, er bloaz 1651. Ar c'hizeller a reas e vez a ziskouez, azezet en e gichen, eur manach bihan a zalc'h eul levr en e zouarn hag a dliz beza Tad menech ar Releg, Julian Bien Assis, rak eun azezenn vat a zo laket d'ezan.

E kichen, eman chapel ar Rozera. A-zioc'h an aoter e weler eun daolenn goz a verk d'eomp ar XVII^m kantved. Dirag, dindan levr an iliz eman bez ar chaloni Hamon Kerguz; skoued an eskob Alan Kerazret, maro er bloaz 1419, a weler a-zioc'h dor ar c'heur. Eur relegouer koat a vir penn an A. Neboux de la Brosse, maro eskob e Kastell-Paol, er bloaz 1701.

Izeloc'h, eman an aoter e vez pedet ar muidira-zi, en iliz-veur, aoter relegou sant Paol. Ar relegouer a zo bet graet, war eur skouer, roet gant an A. Abgrall; eman e virer penn sant Paol, gant darn eus eskern sant Herve, sant Laurans, ha sant Jaoua hag eun dreen eus kurunenn speur Hor Zalver. Kloc'h sant Paol, an Hirlas, a zo harp ouz aoter ar relegou; sonet e vez war benn ar bardone-rier d'an 12 a viz meur ha d'ar zul kenta a viz gwegolo; ar zon eus ar c'hloc'h-ze a zo mat da bel- gant an droug penn hag an droug skouarn.


Dindan gwareg moger chapel sant Paol eman bez Maheved Kervoran e Taule ha di- rag, re daou chaloni hag hini Mari Amis Picard, ganet e Gwiclan, a vevas epad seitek vloaz hep boued all ebet ken nemet ar communion hag a varvas er bloaz 1652. He buhez, leun a vuzudon, a zo bet skrivet gant an Tad Maner. N'eo ket ankounac'haet c'hoaz e Kastell-Paol hag ar vugale vihan, evit ma teuiou nerz d'ezo en o divesker, a vez lak- et da vale war he bez.

A-rak en em gant gant ar chapel-kroaz e kavomp c'hoaz chapel atroned Kerantret, e Plougoum; gwelet a raer o skoued, — warnan eur Vari- vorgan o kribat he bleo, eur mellezour en he dourn, — ha bez unan anezo, Kristof Trao- nelon, person Plougoum, a- raok, ar bloaz 1500. Ar chapel- ze breman eo chapel an Aot- roned Guchriant.



Unan eus skebell iliz-veur Kastell-Paol

Er chapel-kroaz ez eus eun aoter goal, kizellet kaer, hag a oa gwechall e chapel Tadou ar C'har- mel. Red eo chom a-ze a-zav evid ober eun dro



Iliz-veur Kastell-Paol

d'ar c'heur ha sellet ouz skebell dero ar chaloniad a zo a-bep tu d'ezan. Ar skebell-ze a zo bet graet etre ar bloaz 1505 ha 1520. War unan e weler eun houd a c'hoari 'r binion. An aoter vras, e marbr du, a zo eur wezenn balmez a-us d'ez; e kroummel ar wezenn-ze e vez laket ar glozenn aour e virer enni ar zakramant, meulet ra vezo.

E traon an aoter-ze, eur maen marbr a ziskouez e pelec'h edo bez sant Paol, diazeour eskopti Leon. Ar skrid warnan a zo bet diverket, na pe- tra 'ta, gant an Dispac'herien; adlaket eo bet adarre evel ma oa a-goz; Sepulcrum Sancti Pauli Civitatis Leonensium Pontificis et Patroni. Obiit anno DLXX (550).

Adre kein an aoter vras ez eus eun aoter vaen kosoc'h ha warni diou armel labouret kaer. War an aoter-ze e kaver skoued Hamon Barbier, abad Luk-Maze hag en doa kement a barrezio en e garg, pa varvas ma c'houennas ar Pab o welet kement a barrezio diberson hag holl bersoned Breiz a oa maro en hevelep deiz. Penn ar chaloni- ze hag a zo bet lakel e zavez da zvel kastell Keryann, e Sant Nouga, a weler etouez meur a hini all, war speurenn ar c'heur, en eur relegouer koad hag a zoug e ano.

Kendalc'homp hon tro ha diskenomp da vont da gnout an nor-dal; izeloc'h eged ar chapel-kroaz

e kavomp eur prenestr, warnan taolenn ar varn ziveza hag an disparti etre an denved hag ar bouc'hed. Pa voe graet inventar an iliz, er bloaz 1906, p'otred ar c'houarnamant a gavas mat terri ar gwer-ze evid gellout en em zila dre eno, en iliz, evel laeron.

Ker Gastell-Paol a c'hell beza lorc'h enni da veza gallet miret, en e zav, eur seurt tamm labour, tes- teni eus ar brud bras he deus bet en amzer drem- met; ra c'hello miret an tenzor kaer-ze, epad kantvejuou ha kantvejuou c'hoaz, ma c'hell bugale

hor bugaligon vihan kaout an dudi d'her gwelet, evel m'her greas pardonerien Tro Vreiz an am- zer goz, pa n'oa ket a ezomp c'hoaz da glemm, evel m'her grea A. Brizeuk, — o komz eus Konan Meriaded a dremene neuze c'hoaz evid beza diaze- zour ker hag eus sant Paol abostol kenta ar feiz kristen e Leon, — pa skrives:

*On a brisé son tronc et nidé son cerceuil
Et Pol n'a plus de fils siègeant sur son fauteuil.*

G. P.

Y. P. GALLOCH (Bleimor) (1)

En deizioù tremenet, e ti eur mignon, e tigouezas d'in en em gaout penn-oc'h-penn gant eun den hag en doa doare da vezan ar pezh a havver e galleg, eun « artiste » : bleo hir ha fuilhet, tog ledan, er eun tamm herboellik, ar pezh a zere ouz eun « artiste » ha netra ken. Va mignon a lavaras d'ezan:

— Chou! drou, hag a blij kement d'oc'h an traou brezonek, ma karit, me a ya d'ho lakat d'ober anaoude-gezh gant unan hag a zo, dre vicher, en o mesk hem- deiz.

Ha setu ni kerkent e kaoz vras, an Ao. D., ha me. — Anaout a rit, 'vel just, Y. P. Calloch' emezan. Sionaz! n'oun ket evit leun e oberon e brezoneg, e gal- leg, avat, ec'h ouzon meur a damm anezo dre envor. Ha kerkent e stagas ganti ha da zispleg, ger 'vit ger, troidigezh unan eus ar peziou kaera a zo el levr: *Deuil, Spered-Sant!*

Dre ma komze, e zaulagad a entane hag e voutez a grene. — Pebez taolenn emezan, n'eo ket 'ta? Penn ar paour oc'h en em ziskouez ouz prenestr ar bin- dion... Kaer, ledant ha splannat barzouez, hini Bleimor. Ha lennet ho peus komzou R. Bazin diwar e benn?

— Ha re des Cognets? emezan. — Hag hon daou e c'houennas er stunan-ze, eur pen- nadig gant meuludi Calloch, 'vel eul litaniou war hon diwezh.

Da gloza, e lavaras d'in: « Red eo d'in, emezan, desk! brezoneg! Deut oun da chom da Vreiz, — rak kreizfeiziad ez oun, — ha breman, e renkan bezan eur Breizad gwirion. Ha c'houi c'helle rei d'in da anaout doare eur grammadeg? »

Setu ni et war ar grammadeg, evit distrei adarre, arök en em gwilat; da Y. P. Calloch.

— Hag anaout a rit, emezan, buhez ar barz, nevez moulet gant unan eus e vignoned vrasan, — gwellan hini en doa, a dra zur, rak hini ebet n'en deus gret kement all evitan. — J. P. Calloch, gant an D' Palaux, e gwerz e ti E. S. L. Brest? Setu eno eul levr hag a raio d'oc'h da anaout ene ar barz e pep tro hag e pep pleg eus e vuhz. Lemit al levr-ze hag e reoc'h anaoudegez, war hevelep tro, gant an hini a zo bet skouer an *Emzo brezonek* da zont, an hini en deus, da genta diskouezet en e oberon, ha n'eo ket hepken

dre gomz, petra eo bezan Breton, hervez ar c'hiz gwirion, an hini a beb amzer bet ha da zont! — Kvitat a reus ac'hanon gant ar c'houi kresket bras ennan d'ober anaoudegez doumozh gant Breiz, he barzed, he skrivagnerien, rak bezan inl, emezan, en o skridou, ar pezh n'eo, e Breiz, an natur en he zao- lennou.

Laouen bras e oan en eur gimidi, diouz an Ao. D., rak netra ne ra d'in muioch a blijadur eget rei da anaout Y. P. Calloch, komz anezan, prezek evit em- bann e oberon.

Kaeran a zo bet gret en doare-ze eo labour an D' Palaux. E levr eo dleet d'ezan en em gaout hepred e kichen « Ar en deulin ». Gant ar goulo-ze en dourn, dremm, skeudennadurezh ar Barz en em ziskouez blonc'h ha peurachu diouz a bep tu hag e skridou o deus eur skeud hag eun deneridigezh dispar.

Sonj am eus c'hoaz, pa oan du-hont, war dachenn ar brezel, va mignon, an Ao. Coroller, — Doue d'e bardoni! — a gasas d'in, skrivet gant an dourn, ar pezh: *Deuil, Spered-Sant!*... Nag a wech e lemmis hag e adlennis? Kredi ré d'in bezan o leun diougan pe kle- gan eur profed bras bennak eus ar re a c'hanas gwe- chall en Israel. E gwirionez vat, emezon, Breiz he deus he frofeted ivez! Kentoc'h hel lavaran c'hoaz, breman pa 'no eus lennet levr an D' Palaux...

Eun dra bennak a vefe d'ober, hirie en deiz, gant al levr-ze hag oberon *Bleimor*: 'n em zervieha diout- o-daou evit ober prezegennoù er skolojou, er patrona- jou, e pep lec'h ma kaver yaouankizou bodet, evit rei da danya d'ezo, gened ha dudl dispar barzonegou Gal- loch.

Gwechall, em eus sonj, eun den hag a anavez en em blije o studia *Drouk-kimij Nomenos*, perle- zenn an *Barz-Breiz*, e levr Calloch, ez eus perlezen- nou ken skeud ha honnez; o studia vefe d'ober, o lakat da lintri e pep stumm dirak daoulagad ar yaouankizou, kaloune bero ha kizidik, speredjou glan ha digoummoull... Pebez magadurezh evito!

Evit ar bloaz nevez, tud yaouank a Vreiz-Izel, pre- ni holl an daou levr-ze da gantan hini Calloch' ha, da lakat en e gichen, evel eur goulo dirak eur skeu- denn sakr, levr an D' Palaux e vignon.

(1) D' L. Palaux; Un barde breton; J.-P. Calloch. Empego St-Il tud, 4, rue du Château, Brest. 15 francs.

MIKAEL AN NOBLETZ

1577-1652

Mikael an Nobletz a lavare eo henvel ene ar vugale ouz eun tamm koar; da eun tamm koar e cheller rei pep stumm; warnan e cheller skriva pep tra; ene ar vugale ive e cheller skriva ar pez a garter, an droug pe ar mad; ar mad, arj zantelez, ma poanier ganto d'o zrei ouz Doue; an droug, ar plegou fall, ma vezont lezet d'ober ar pez a zeu en e tenn; ma ne vezont ket hentel hag harpet.

Boda a rie ar vugale e chapel santez Madalen, hag e displesje d'ezo skler gwirionezou ar relijion, hag e konte istorio-riou evit rei d'ezo gwelloc'h da gompen. Ar re a zeske mat o deze metalennou, kroazioz, skitennou ha zoken madi-pon. Ar vugale o doa evitun eur garantez vras, ha pe' volent o lont, ez aent d'ar red d'e goust.

An dud vras ne goumenet ket talvoudegezh an deskadurez kristen hag a glasko ober goap ens ar beleg a zolle, evel e amzer gant bugele. Pe' volent o tremen, e lavarent: « Setu ofar ar beleg fol o vont en hent ».

Ar vaoz e roe lojeiz d'ezan, o klevet petra lavare an dud, he devoe mez hag a zisklerias ne c'helle mui e zalc'her en he zi.

Met Mikael a gavas eun ti da brene e Douar an Dug, hag eno e chomas gant e c'hoar Mac'harit. E holl beadra a lakas da brene an tize. Red oa, evit gellout ober vad da dud Kemper.

Nebet a gemeriz a veze e selou ar misioner en iliz. Evelato ar re haour, an dud dister a zeue hag a zente out. Meur a hini a gavas d'ober eveladan fae war ar bed hag e blijadurezo.

Eur chalon ens an iliz-veur hag eur beleg eus Sant-Vaze, an aotrou Bosser (pe Bocher) a voe a galon gantan. D'an aotrou Bosser e teskas an doare da lakat an dud da govez ha da gommunia alies.

Epad m'edo e Kemper, Mikael a brezegas ar C'horaz da Leaneze Lok-Maria hag a zisplesgas dirazo ar Stabat Mater. Mont a reas ive da veur a burroz eus a Gerne, evel ar Faou. Diredet a reas, ouzenn, da Blouern, da Gerodera, da wetel e vamm war he zremenvan Houman a dremenas ar blouezioz diveza eus he buhez evel eur zantez hag he devoe eur maro kaer meurbe.

E c'hoar Anna, oa ive holl da Zone, a en em dennas er vourch, goude maro he c'herent, e kichen an iliz. Bendez e kleva an ofrenen, hag e tremene he amzer o pedi, o ten levion santel, oc'h ober katekiz d'ar vugale, o wetel ar re haour hag ar re glanv, hag e c'hellomp kredi e talvezas he fedennou hag he finijennou d'he breur epad e vissionou.

Misionou e Konk-Kerne, Pont 'n'Abad, Goyen (Audierno)

Eus Kerodren, Mikael an Nobletz a yeas, da Konk-Kerne, ha dre vor, a c'hellomp kredi. En em gant a reas er gerze, eur zultez, da eur ar Gousperou. War eno ez eus d'an iliz ha goude ar Gousperou, e pignas er gader da zisples-



ga ar Batez. Komz a reas e berr gomrou eus misterioz brasa ar feiz. Soudardet a oa e Konk-Kerne d'ar poentez, rak Konk-Kerne a zo eur ger keltel gant moerion. Ar re a oa er Gousperou, pa glevjont ar prezezer, a yeas er mez eus an iliz; an darn vrasa eus ar vourchrien a reas evi ar zoudarded. « Debez beleg ! emeze. Eman o klask deski d'emp eur bestenn hon ens desket gand hor magere ! ». Ar re a jomas en iliz a voe sonet muioc'h c'hoaz o klevet komz eus mister an Bredideli, mister an Inkarnasion. Ha goulkondez sur a-walc'h, ma vije bet soulemet diganto displeza petra eo ar misterioz-ze, e vijent bet ne'het.

Met lorc'hus evel ma oant, e c'hoantel klevet prezezenno troet brao, a blij d'an diskouarn, met ne zesket netra d'ar spered. Ha Mikael an Nobletz a voe kemeret ganto evit eur beleg diskiant.

Er marze e teuas da Konk-Kerne, da wetel e c'hoar, eun itroun vras eus Leon, an itroun a Geronartz. E c'hoar a oa o chom demtost da Konk-Kerne. Komzet e veze a bep tu eus ar

fol en doa prezezet d'ar zil a-rak.

An itroun a Geronartz a c'houlenas e hano, ha pa glevas oa Mikael an Nobletz, e fisklerias a vouez uhel ec'h anavezat mat ar beleg-ze, eur beleg santel, en doa gret kalz vad dre e vissionou e Leon a-raok dont e Kerne. Konta a reas diwar e benn meur a dra a ziskoueze oa santel.

Souezet e voe an dud o klevet an itroun a Geronartz, met n'ez ajont ket muioc'h evit-se, da zelou ar misioner, hag heman a zilas Konk-Kerne evit mont da Bont 'n'Abad.

O liguezoet e Pont 'n'Abad, e c'houlenas digand eur vaoz, an itroun a Bortmoreau, e pelec'h e veze kavet paper da brene, rak bendez e displesje kalz paper o studia hag o skrivo. An itroun a respontas d'ezan gant rustioz, rak henvel oa ouz eur reder-br, eur c'hasker, bara. Met da c'houde e teuas keuz d'ez, ha ne c'helles ket chom hep lavaret d'he gwaz petra he doa gret. Ar gwaz, eur c'hrisid mat, a lavaras: « Red eo komz ato gand nadelez d'ar re haour, ha gant doujans d'ar velen. » Hag an aotrou a gasas kerent unan eus e vevelen da glask ar beleg pouar, evit kinnig d'ezan eun nebeud gwennezh ha lavaret d'ezan e vije laouen oc'h e zikomp hep tu m'en defe ezomm. Ar misioner a drugarekas a greiz kalon, hag evit digall an den mat-ze, e teskas d'ezan ha d'e famill kare gwelloc'h c'hoaz an aotrou Doue, sevel uheloc'h er zantelez.

Mikael a jomas eur pennadig amzer e Pont 'n'Abad. An holl vugale a voe desket d'ezo o c'hatkiz; kevez a reas ive an darn vrasa eus ar re goz. Eus Pont 'n'Abad ez eas ive da Enez Tudi, a zo e kichen, hag e kavas eno tud a volentez vat, evel e Eusa ha Molenez. An dud pouar-ze a lenve o klevet e brezezenno ha a c'houlene kevez o fec'hejou.

Met, p'en em gavas e Goyen (Audierno), ez eas dishenvel an traou. Eno ez oa ive tud pinyinid, a c'houneze arc'hant oc'h ober kemm-veze. En dro ganta ma pignas ar misioner er gador-brezez, ez ajont er mez eus an iliz,

evel pa vije bet an tan war o lere'h; ne jomas nemet ar merched. Mikael, droug emana, a zisklerias da dud Goyen e vijent katizet gand Doue, hag e vije lammet diganto ar maduze e staget o c'halon outo. Hag e gwirionez, nebeut amzer goude, e kolljont er mor al lodenn vrasa eus o bagou karget a varc'hadourez.

Ar misioner a ra eun dro e parrezioz war ar mez e Kerne

Mikael a anavezet peur e iliz dilezet eur vro bennak evit mont d'eun all. Pa ne c'helle mui kemeret tamm boued ebet, e veze dre-ze oa galvet gand Doue da vont en eul lec'h all.

Gozout a rae mat oa aeseoc'h goumli kalon an dud war ar mez eget kalon tud ar c'heriou. An dud diwar ar mez a zelou gand muioc'h a zojans gwirionez an Aviel, gwelloc'h int da zent ouz ar beleg, n'o deus ket kement a lere'h, ha nebeutec'h, peurlies, ec'h en em roont d'an diuzurioz. Lakat a reas eta en e benn mont d'ober eun dro dre barrezioz Kerne, hag e prenas daou varc'h evit bechi, unan evit e zojans eusan, eun all evit dougen an taolennou. Met ne jomas ket pell an daou varc'h ganto. En eur vont gand e hent, e kavas pesketerien, gant war o c'hein eur lec'h pesked, pommer meurbe. Leun a drouez, e kinnigas d'ezo e zaoz varc'h da gas ar pesked betek Kemper.

Met, epad an noz, unan eus an daou varc'h o voe drebet gand ar bleiz, egle a voe lazet o koueza en eun toull-dou. Ar besketerien, aon bras d'ezo, a zeuas d'en em daoler d'an daoulin dirak Mikael, da c'houlenn pardonn, ha a gwe d'ezo e rankent paer eur salc'had vras a arc'hant. Peger sonet e voent o wetel ne c'houlenas ar misioner gwenneb get digantol. Ne reas nemet mouez c'hoarzin ha lavaret d'ezo dont da zelou e brezezenno. Kinnig a reas da Zoue ar pez a oa c'hoarvezet, ha kompren a reas n'eus ket ezomm a goez evit mont da brezez an Aviel.

Supersitionou, briz-kredennou war ar mez

Staga a reas d'eo labour gand nerz-kalon, hag ec'h en em lakas da gelenn al labourerien, da zeski d'ezo o c'hatkiz. Dizek bras oant war ar relijion, ha dreist-holl, troid da gredi traou diskiant.

Setu unan eul lodenn eus ar supersitionou eus an ameze-ze. Gwellet e veze merched o skuba ar chapel telta d'o zi hag o teurel ar boulltreen er mez d'an avel, evit m'o defe o gwazed hag o bugale war vor avel vat da zistrei d'ar norz. He all e genere skeudennou ar zent er chapelioz hag a lavare e skofent warno a daoulin skourjez, ma ne zisrofe ket d'ar ges, buan ha ya'ch, an dud eont o c'hadal. Hag e raent ar pez o doa lavaret. Skei a reant war ar skeudennou, ne c'hoaz e lakant anezo an dou, pa n'o deze ket o goulen.

Hiniennou a dale en o fark eun trehez pe eur goumli gann evit difenn o loened ouz ar bleiz.

Pa veze maro unan bennak, e veze tolet er mez eus an ti kement hame doue a veze ebret, gand aon ma veze heuzet ene an hini maro. D'an tontad, a-raok Gouel Yvan, e veze laket mein en tan, evit ma c'helle eno ar gerent maro dont d'en em domma.

An dud saonak a zinsse er chapelioz, a zo ker stank war ar mez e Kerne, hag ar c'his-ze da eno ar zent, ar c'his diskiant, a veze kavet mat gand an holl.

Evit saludi al loar nevez e veze lavaret eur Batez war an daoulin. D'an dez kenta eus ar bloaz e veze kinniget eun tamm bara hag amsan d'ar feunteunioz. Lod a daole enno kement a damnon bara hag a oa a dud en ti, hag hervez ma chome an tamnon war an dou, e lavarent e teufs ar maro da skei unan pe unan eus an ti.

Gwasoc'h c'hoaz. Meur a hini a ginnige traou d'an diaou e-unan. Kredi a raent, evel heretiked eus an amzer goz, oa gret ar groundrien vat gand Doue, hag ar re fall gand an diaou. Evelse ar gwizil, ar zegal a oa gret gand Doue, an ed du gand an diaou. Hag hiniennou, goude beza daslunet, er eur park, o ed da, a daole doumadou en ed du. D'ar plac'h nevez, pa zimere, e veze roet ive ed du da skuill war he lere'h dre ma z'ae.

Meska a raent gand o briz-kredennou traou santel, evel eun gaved pedennou, eun maved ofrenno. Pa veze klav eun den bennak, e kave d'ezo o bet skot gand o zad koz, maro peil a oa. Hag e lakent eun maved ofrenno evit an tad koz, evit na zeufe ket mui d'ober drog.

Bez ez oa ive sorsorien, strobilieren, a raer ar vicher da hares an dud hag al loened gand komzo, orbidou diaoulek, hag a c'houneze kalz arc'hant.

Mikael an Nobletz, evel a wetel, en doa kalz labour d'ober evit dont a-beun da zisc'hwirizenna ar gizion diskiant a oa en em skignet e bro Gerne. En em erbedi a reas ouz Sant Kaoutin, kenta eskob Kerne, evit beza kreiz kant vloaz goude m'oa bet sklerijennet gand ar feiz kristen. Gouleno a reas digantan nerz a-walc'h evit gellout kas da benn e labour.

Digermet mat e voe e pep lec'h, hag an dud e zeloue gand evez a zeske o relijion, a zente ouz ar c'hentelioz roet d'ezo; niverus e tiredent d'an ilizoaz da glevet ar misioner, hag ec'h anavezat o doa bevel betek neuze evel chabli; keuz a ziskouezet, hag o ger a raent da veza gwelloc'h en amzer da zont. Ar briz kredennou a voe dilezet, hag ar wir relijion a voe heuliet, ar zakramancho resevel gand feiz ha karamet.

Misionou e Kap-Sizun hag e Enez-Sizun

Mikael an Nobletz a brezege e parrezioz ar Chap, pa glevas ano eus Enez-Sun, dirak Desgar-Blaz, diaou leon bennak eus an douar bras, d'oa beleg ebet eni d'an amzeze, hag ar misioner en doa youl da vont da gant an dud-ze, dilezet e kreiz ar mor bras.

Dies eo mont da Enez-Sun, rak alies e vez gwall-vor; reier a zo etre an enezez hag an douar, hag ive zvel eur ster vras, ar Raz, a red gand nerz ha kouarn, hag a zo rikulus da drezi.

Trak-se e vez lavaret:

Biskoz iden ne dremenas ar Raz,
Hez n'en devije bet aon pe c'hilaz.
« Va Doue, va zikourit da dremen ar Raz,
Rak va hag zo bilhan, hag ar mor a zo bras ! »

Enez-Sun a zo eun tamm enezez, reier bras endro d'ez, izel war e c'horre ar mor, e riski da veza lonket pa vez gwall amzer ha mare bras. Riskio eur voger vras ha ledan he difenn ouz an avel-kontak.

Pa vez fruzet ar voger, ar pez a c'hoarvez a-wecho, an dud ne vezont ket heb enkre. An douar, ne gentec'h an traouz, a zo ramnet e tachenno bilhan. Peil hini a giosk kaout e damm, evit lakat eun nebeud heiz pe avall-douar, hag eo het ken lotennet an douar, ma z'eus tachenno n'int ket brasoc'h eget lier.

E amzer Mikael an Nobletz potred Enez-Sun, ledan-ve dioualou ar mor, a oa brudet dre o c'hrizid. O Bjadur oa kaout nense, ha, war a gontez, ec'h elumnet goude war ribl ar mor, war ar reier, evit lakat ar bagou bras da fasin gand o hent ha d'en em goll.

Me pred n'eo an draze nemet geier, soredhennou. Ar pez zo s'vir, eo e vez laouen, an dud a zo o chom e kichen ar mor, p'en eus gann tamm pense en aol, gwin, koad ne draou all. Kredi a raent peurlies eo an draze d'ezo. Met ma z'eus meur a dra da rebech d'ezo, ez eus ive d'o meul evit o hardisege, o nerz-kalon, pa vez tud da zaveti. Prou a lavaro niver ar re a zo bet savetel gand an Arvoriz, paotred Enez-Sun ha re all. Bep bloaz e vez klevet ano eus an taoulu kaer gret gand.

Tud Enez-Sun a zo hirio pinyinid pe, da vilhana, brao eo ar stal ganto. Kalz arc'hant a c'hounezoet o pesketa. Er zeteket kantved eo dishenvel an traou, ne zavent ket evel hirio a wez d'o fesked, ha ne goueze ket kalz a arc'hant eno o godollo. No doa ket an dredezo eus an heiz o dia errom evit heva. Evel n'oa ket c'hoaz a aval-douar en hor bro d'ar poentez, e lakent panez en o zachenno hag e teurent, gand o fesked, panez ha bara heiz pouzet en c'halet, dindan hulu bein, rak bein eo a zevent d'ober tan, ar pez a raer c'hoaz ha moged krenv en o ziez.

(Da gundel'her).

J. U.

DISMANTR JERUSALEM

Ar pemp den a chomas eur pennad dilavar, ken na davas er ru trouz treid an diavezidi. Neuze, unan eus an daou estranjour, Ambiorix a lavaras gousadik e skourm e vignon : « Deomp en dro ! »

— An novez a zo kaer, emezan neuze da Jonathan; balé diuze war ar mézou a hijfe d'omp, oiz skod al leor hag ar slered. N'eo ket re d'omp lakat an noz da astenn an deiz, ni hag a zo tremenedi en eur gêr ken brudet. N'ho pet ket aon na c'hoarvezfe droug ganoomp, na ganeoc'h ivez euz hor perz. Ni hon eus dilezet falz doueou ar Gres ha Rom evit azouti Jehova, ho Toue.

— Grit hervez ho youl, eme Jonathan; taolit ivez, koulskoude penôs bugale Israel n'int ket ken mistri en o bro hag eo distler ar c'haloud o deus da ziferno mignoned.

— Ni en em ziferno, eme Domitillus, en eur vous-c'hoarzin; hezit diankrez ! Ni a ouezo, en em zifenn, na vez red.

— Kenavo 'ta, eme Jonathan; aman e vo heilhet epad an noz. Dor zigor a vezo, pa gaeoc'h.

An daou zen yaouank a ziskennas gand an diri, goude beza sadudet an ostiz ha Simeon. Ruben a brennas an nor war o seoulion. E dad a gemennas d'ezan leurel veze na bignie den ken d'an nech'keit ma vijent er gamb, e kichen, Simeon hag hen.

Ar gamb ez ejont enni a oa henvel, a ziabarz, ouz ar sinagou en doa kuzlmet ar Judevien 'n em voda emmo da lenn o leorion sakr, abaoe an amzer ma oant bet prizomet e Babilon ha disparliet diouz an Templ. En eur penn, e oa eur c'houfr goloet gant eur pallenn moug ha warnan leor pe rollad parch al Lezenn; etre ar c'houfr hag ar vezer e oa tud azezet war skebell hag ez-eün d'ez, war skebell all, em nebeudig tud all. War em tamm pondale, e kreiz ar zal, e oa eur gador henvel ouz eur gador-brezek. Eun den baro du, oa en e zav enni hag a gomze. Tewel a reas ken n'eo devoe an daou-man kavel peb a skabell.

E oan o lavaret, emezan, pa welas an holl, war evez adarre, penôs, pa oa deut hon heere Jonathan da chom aman, breman zo tri bloaz, n'eo ket hepken abalamour da vezan war ne z da c'houzout pegouiz e savje steredenn hon Mesias, nag evit gellout diarbenn ezeoc'h laouin yud Herodez, mel abalamour da virot ha da guat dre ar vro, a bep tu, an arc'hant hag an armou dastumet a-zivaz bro gant hon brederus eus



Ganet eo ar Mesias, Alletitia!

ar Gres, an Ejipt, Babilon, Antioch, Smirn, rak e pep korn ar bed cle'h ma vez pedet hano Jehovah, hano Herodez ha hini ar Romaned a zo kasael ha disprizet hag ar c'hrî forz warierc'h ar Zalver a deu da vezan t'er ha krenv evel ar gurin, hirvoudus evel klemm an hini eo skallet e ston gant ar zec'hed hag a c'halv heb ehan, glizenn an nev d'hen distanan !...

Ar prezege en doa savet d'an nech' e zaulad-gad leun a zaerou; e zigreoc'h a oa astennet gant ha ken entenet e oa e zremm ma ne deue komz ebet ken war e vuzellou. Holl « Wazed ar Mesias » o doa savet o daouarn en eur c'halvadenn vev, hag ar bedenn-man a strinkas neuze, e gwirionez eus kalon pep hini anezo :

— Ra gouezo ar Gliz eus an oablou ! Ra ziskenn ar d'ust eus barr an Nenvou !

Simeon eo en doa adlavaret pedenn ar profed; met daoust d'ez i da veza ken birvidik war vuzellou an holl, n'he doa ket an hevel-sep talvouddeez o genou pep hini, hag Azur her gouie ma. Dizrei a reas eta kerkent war gonzo ar prezege hag e c'houlenas :

— Kuziadellou 'zo grêt; hogen, dâ eo d'omp holl gouzout pelec'h eman pep hini anezo; gouzout ivez etre daouarn p'ieu en em evav an arc'hant !

Jonathan a oa e dro da bignal er gador-brezek, rak d'ezan e oa da respont :

— Brederus, emezan, gellout a rafen disklerian d'oc'h ped gwech ha pegouiz ha gant p'ieu ez eus bet degaset aman arc'hant hag amou, nemet eo gwel gant an lavaret herr ha herr eo gant lidou ar Pask eo bet, hep bloaz, kresket ar muian, hag a-bell, hon tenzor e pep stum. Pep hini a zegase gantan e brof hag e korz ar guel, koulz en tiez 'vel dindan an tellou savet endro da gêr Jeruzalem, tud eus hor perz o dastume e kuz hag o eluse, sioul ha dizebiant, d'al lec'hioù merket en arôk. E-mesk kemend-all a dud, kanvalet o vont hag o font, ne veze ket laolet ivez outo.

Ar'hanta, e tu-hont d'an ti-man hag en deus en e gozioù, fouillet pell dindan an dosenn, klezeier ha skoedou, peadra da arman an holl gwazed a zo henoz e Bethleem, hag arc'hant da zamman meur a ganval, bez ez eus, e keolion-all, armou c'hoaz ha ne c'houlenont nemet gwad d'o diverglan...

E traonienn Hinnon, e Bellir ivez, neb a furchfe klezeion ar roc'hel a zizolefe gant spouron klezeier ha klezeier, evel pa vefe deut mein Juda d'en em droi en houarn evit argas an estranjour milliget!...

Kalon ar Judeo a gomze adarre. Da vonez skillrus ar prezege, an holl a zavas en o zav-sounn hag eur youc'hadenn, mouget kerkent gant dour Jonathan, a gargas ar gamb evel eun taol trompilh.

— Val a ra, emezan, diskargan e galon, met bezomp war evez; an enebour n'eman ket pell a'chan!... Koulskoude, kaer en deus Herodez magan ha pasan spierien, kaer en deus, hen e-unan, dont d'en em veskan gant ar bobl, deiz al lidou bras, 'vit furchal en he c'halon, hiskoaz n'eo bet anavezet gantan hano « Gwazed ar Mesias ».

— Hen anaout a ray hepdale! eme Azer.

Ar c'henseurt en doa komzet kent, Henoch e hano, a c'houlenas neuze :

— Ma parte fenez sleredenn ar Mesias, ma tenfe e vonez da c'hervel e « Wazed », ha ni 'zo barrek da respont d'e c'halvadenn ?

— Koulz ebet gwelloc'h dibabel! eme Jonathan. August en deus digaset d'omp aman eur bagad soudarded, soudarded kadarn dre ma 'z int holl a vad David. Kentoc'h, evel ma lavarede, dour ar Mesias eo en deus pouzet impalar ar bod, ar Mesias, an impalar neuze eman e sleredenn war ne zintri a-zioch hon pennou.

Klevit, emezan da Henoch; aze, e goudor Tour ar Bastored, ez eus eur bagad mesaerien, dihon noz-deiz, hag a vezo evidomp, pa garimp, kannaded d'ezan. Anaout a ran meur a hini anezo hag e'h ouzou n'eus ket unan ha ne garfe rei e vonez evit Mab David.

— Hag o rafent petra ?

— Ez afent da vrudan ar c'helou dre ar vro, ha da rei urz d'ar bobl d'en em zastum demodet d'al lec'hioù n'eman kuzet hon amou.

— Ha goude ?

— C'houi 'oar petra 'zo bet divizet pell 'zo. Kelc'hiet e vefe kerkent an tour Antonia ha palez Herodez ha laket d'ar maro bourrez hon tadou...

Simeon a oa o sevel evit komz, d'e dro, pa voe digoret an nor gant herr... An holl a lammis en o zav... Penn Ruben, straitheil holl, en em ziskouezas war an trejrou :

— Deuit!... Deuit eta!

Ar bagel a ziskouez gant e viz eul lec'h warnu Tour ar Bastored :

— An tan! emezan; oh! na pebez sklerijenn!

Holl e oant deut d'an daou-lamm war ball an dôenn hag e troent sebezot o sellou etrezek al lec'h ma lavare ar bugel. Hogen, hini anezo ne wele netra. Eo, Simeon; hag em dra bennak eus ar splandder a wele a dlee paran war e zremm, liou skler ar c'hoar entenet warnan.

Ar re all, muioc'h-mui sabalet, a droe, gwech warnu Ruben ha Simeon, gwech war drezek an Tour, ha ne ouient tamm petra da zonzal. Simeon a gavas ar gomz da genta :

An Atron, emezan, a zo lost! Alletitia!

Ne oa ket rouez elouez ar Judevien gwelloc'zeioù seurt gant hini an novez-ze. An holl a respontas en eur vonez: Alletitia! hag e c'houlenont digant Simeon, o'h en em stardan endro d'ezan, petra en doa gwelet :

— Gwelet em eus an nevu digor, rak n'helle bezan nemet eus an nevu ar splandder dispart deus partel warnon... hag he deus beuzet va ene.

Ar gerion o doa poan o kaoul foull da zont ermêz, e gortzilhenn stanket c'hoaz gant ar fromm.

— N'ho peuz klevet komz ebet ?

— N'am eus gwelet nemet eul luc'bedenn divent ha kaer...

— Ha breman ne wellit ket ken ?

— Netra!

Na Ruben ivez ?

— Eun tan bennak e oa hennez, enaouet gant ar Bastored! eme Azer.

— Perak neuze, eme ar bugel, n'her gwelec'h c'houi ket ?

Henoc'h e lavare :

Skriwet eo: Hirio ar sklerijenn a lintro warnomp. Daoust ha deut eo an eur merket ?

Dindan bolz an noz skedus ha flour, eun ezeun c'hlan ha skanv a c'hoaze, da vare, hag a zigase ganti baradofu levezne ma sante pep hini e galon 'vel o leuzi en e greiz.

Den ne zonzje ken dizrei d'ar gamb da hereber kont an arc'hant hag ar c'hozeier dastumet evit ar Brezel meur. Mouzeion ar brofejed koz, zoken, a oa tavet war o diweuz. Dilavar e c'hortozent, boemet gant eun dra bennak a vuzudus a oa endro d'ezo hep ma c'hellent hen izout.

Ar novez, koulskoude, a deoc'h a gammajou sioul hag ar c'hilhog a oa krog da zougani brod ha safar an deiz. Perchen ostaliri « Leon Juda » hag e genseurtel o devoa 'vel eur seurt kredenn o doa grêt, e berr amzer, eur gammid hag he doa laket, evito, brasoc'h eget ar bed, etre deoc'h ha hirio. Satu perak ne voent ket gwall souezet o klevet gant an daou estranjour o tizrei, tiz warno, da gant an ti, ar gomz eslammus-man :

« Ganet eo ar Mesias ! »

« Ganet eo ar Mesias ! » En eun taol-krenn, e sant-jont, gant ar gomz-ze hepken, ar gwad evel nevezet en o gwazed, o c'hlan o lammat 'vel eur galon nevez-flamm: « Ganet eo ar Mesias ! » Pebez gériou, godet aboe 4.000 bloaz! Evid komzou ar groudigez, e roont ar vuhuz d'ar bed. D'ar bed? Da bobl Israel, da vihanu! D'ezo ar Mesias-ze! Eus o gwad eo, hag evito o teu war an douar!... Penôs eo dre daou bagan e'h anavezont ar c'helou ?

Domitillus hag Ambiorix n'int ket ken an hevelep tud. Kredet rafed emaint o paouez kvitaat tavarniou Bethleem.

— Ganet eo ar Mesias? A beleoc'h e'h ouzoc'h kemend-se?

— Ar Bastored o deus klevet ha gwelet hag o deus lavaret d'omp!

Emaint o font! Dre gêr a-bez e youc'hoat ar c'helou!

— Deuit er gamb! eme Azer ha konfit d'omp petra ho peus klevet!

Dastum a ra, a-zindan e dreid, rollad parch ar Skritur a oa krog emman Simeon pa deuas Ruben d'o gervel, hag e c'houlenont diganto, en eur azezan, ar re all bodet, talarek war e dro.

— Petra ouzoc'h-hu?

— Wardro hanter-nuz, eur sklerijenn vuzudus he deus partel 'us da Dour ar Bastored... n'hell ket peurlavaret e c'her, ma teu Jonathan er gamb hag ouz e gostez eun den hanter-houez, gwisket gant truilhou ha kres'hen denved.

— Satu aman, emezan, unan hag an deus gwelet ha klevet!

Tri denzor ar Ramps Goulafrus

Gwehall goz, d'ar c'houlz ma komze al loened ha n'o doa ar yez-dent, e veve e parrez Kommana eun intañvez keiz n'he doa nemet eur mab hanvet Jalm. Eur garantez ken tener he deiz evit he frot ma lize azevan d'ober e benn a-bed an dez hep goude sikour ebet digantan. Setu ma oa deuit Jalm da veza brasa lank ar geriadenn; met dre ma kreske e kouste muioc'h-mui d'e vamm hag hep dale houman e rankas gwerza, heb an tammig, kenent tra he doa evit puervei d'o ezomoum. Ne jome mui ganti nemet eur viorc'h, hag ar bara o veza deuit da vankout en ti, e voe red d'ez en em zizober diouls. Goulenz a reas digant he mab mont da werza ar viorc'h da four ar Releg. Jalm a yens, curus, d'ober eur bale. En hent e tigozeuzas gand eur c'higer a zonge en e dog piz brao ha lugerinus. Ar ginaouez e c'hoantes kerkeret o c'haout; deuit a rae gand ar c'haout d'o c'haout da c'hoari, O velet kement all ar c'higer, eur pote fin, a lavaras da Jalm: « Ma kares rei d'in da goz beoc'h, me roio d'in ma fiz brao holl » — « Ya! Ya! eme Jalm », en eur astenn nask ar viorc'h d'al laer fin, hag en eur lammat war ar piz a lakas en e dog. Lurus da veza gret em trok ken kaer, e redas. buan-buan d'ar ger d'o diskouez d'e vamm. Mantret eus eur zotoni ken bras, ar paour keiz maouez a zavas droug emi hag a c'houridrouzas kale he mab, evit ar wech kenta eus he buhez, hag en he fennad droug, e sifras ar piz dre ar prenest e holl. Siouaz, ne oa netra da zehri en ti, hag en noyez-se, mamz ha mab a rankas mont d'o gwele hep koun.

Jalm a gave dies, rak gouzout a rae e oa manket. Buan e kouskas goulskoude. Antronzou a zihunas, ar gambr e oa fennal ha dre ar prenest a-vech ma toue eur bannig sklerijenn. Smeuzet holl, ar pitr a redas d'ar prenest hag e zigoras. *Chom a reas sebetet o velet e oa gwizienet ar piz diouet epad an noz, hag e oant savet, savet, savet ken uhel ma oa kuzet o femon e c'houmoull, ouspenn, an troiz skoulmet ha kemmesket o doa gret evel eur skou e zave beteg an nerv. Jalm a drijpas gand ar c'haout da bigal ganti. Hep dihana e vamm, e yens er metz an ti hag e lakas eun troad war ar genta barz, egile war an eil hag e kendalc'has evelse. Hag e pignas uheloec'h eget an doenn, gendize uheloec'h eget ar gvez, goudeze uheloec'h eget kloch'hañ an liz, goudeze uheloec'h eget Hoel-Trevezed. Meur a wech an eon a betas emman hag e voe varmez dis-kenn. Met e c'haout da velet trouz, hep pouz da gend'chei e veach rikhas. Erfin e reas er c'houmoull, e treuzas anez, e pignas kalz uheloec'h c'hoaz hag e sante e neze o vont dioutan pa velas dreist e henn eur vov di-navezet a glaskas bann troad.*

Brevet gand ar skuzider, e c'houvezas war ar geet, hag e kouskas pell. Pa zihunas e oa deuit an abardez. « Poent eo d'in, emezan, klask eun ti da gousket, rak ma 'z eus loened nemet eur aman ha ma tigozeuzal gann er muez e tebirat ac'hanon. Ouspenn, moun an yas abaoe dre'h da noz, hag an distera kreinn bari amann gand eur werennad chistr d'ober d'ezan dis-kenn a vele deuit, ma a. Bate a reas hep gwelet den; hag abenn ar fu e velas eur maner bras, eur stumm is.



kis d'ezan. Eur sklerijenn a lugerine an unan eus ar prenest. Jalm a skoas war an nor-borz; eur vaoez koz rouennet all a deus da zigori: « En han' Doue, emezan, roit d'in da zehri hag eur bech' plouz da gousket ». « Met paour keiz potrik, emez, en em lakat a rit en eur riskl bras en eur zont aman. Heman eo Kastell ma mab, ar ramps Goulafrus. Ma kav ac'hanoc'h en e di bremaik pa zigozeuz, e ravo ho rosta-erzevez, hag ho tebro penn-dabenn kig hag eskern, d'e goan ».

— Mamm-goz, eme Jalm, me ho pedi, an lezit da loja aman an noz-man ha roit d'in eun dra bennag da zehri, rak emañ o vervel gant an maon. C'houi an c'haoz en eun tu bennag, al lec'h n'ann c'havo ket ar ramps. — Gwas a ze d'oc'h ma vezit tapet, a c'hrosmolas ar wrac'h koz. Breman e oueit ». Lakat a reas war an dol bara, kig sall hag eur podad chistr. Jalm a zrebaz hag a evas; santont a rae e neze o tont en dro pa glevas a greiz holl an ostizez o c'haout: « Diouall! eman ma mab o tont! hag e vuntas anezan er fourn hag a sarras varraun Buan; ker-kent e tigozeuz ar ramps en ti en eur lakat ar moerouza da grena gand trouz e vountan benn. C'houest a eure an eil hag a lavaras d'e vamm: « Souezus eo, me' zant aman c'houez Kristen ». — « Hunvrel a re eme an hini goz. Azez aze kentoc'h ha debr da zoubenn. — Hag e trempas e zoubenn en eur varken. Pa en doe ar ramps lonket holl, e skrabas e gof gand plijadur, e c'houllous eun donnell win hag e tostas ouz an fan da en nem domma. Ha goude a lavaras d'e vamm: « Mamm, degasit d'in ar c'haout eus ma zri zentoz, ma biniou strobineller, evit ma c'hellin, en em zidui a-rok mont d'am gwele ». An hini goz a zegas ar benveg gouellet; e reas nemet e zomer etre e zirezh hep c'houeza emman, ha kerkeret ar biniou a zontas tontu ken dudius ma santas Jalm e zorf o krena gand al levezeg hag e dreid o fic'hal gand an drebon dansal, ha goulskoude e c'hellit kredi ne os ket en e zes er fourn.

Abenn neubet amez, e lveas oc'h en em gemmeski gand ar zen dudius a zibred anezan, roc'h hevel ouz Hejodeg eun douezen d'vri neuz e kredas riskia e henn er-mez ar fourn. Ar ramps a gouzke war eur gador hag a lezas d'ar rouezse da genza d'an douar ar biniou strobineller a lavas kerkeret. Jalm a zellas en-dro d'ezan. An hini goz a oa et kuit. Tapa reas ar biniou, digori a reas an nop didrous hag oc'h en e z'as er metz. Al loan a hez. Eilz Helezh e set war an douar pe z'wir e oa ar vroze keiz toetoc'h d'ez. Ar sklerijenn skedusas her sikouras da gaet heb poan e skeul-laz; hag ar biniou a-stribil euz e c'houez, e tiskennas ar banna ma c'hellas. Degouezet e hez ar ger, e rikas d'an nor, e kavas e vamm ne'bet alio var zav, e pakas d'ez, e konfas d'ez e veach beemus, e tiskouszas d'ez ar reza e zigase gann bann e reas d'ez da oloset eun nebut eus ar c'haera sontra, e Abalamour d'ar biniouze, emezan, ne vezo ket da deoc'h labourat ken. Me 'velo d'ar pardoniou ha d'ar gend'hoi, ne zono gantan, a lapaio an dud da zansal hag e lemmet d'in ma zog a wewentien ».

Jalm a grous eta gand e vicher-soner; ar pez a zone a oc ken drant, ken klauy, ken kaer, ma kavse ar mero'ed koz o-mann ouz e zelant, d'vresker o yououkiz ha ma c'houez d'eviziu matz met luan e skuzias eus e vuthez Helezh. Hag e sonie, e Pamma c'hell beza douz denzor all ar ramps Goulafrus? Ha ma 'z afen da velet? ma pignfen adtre gant ar skeul? Pa doullas keoz d'e vamm en doa prenet d'ez eur veech' all, houman a grias hag a reas kement ha ma c'hellas evit heb d'ezila; met eur mab en doa hez a oa eur pennek eus ar c'henna bouzet d'ober alio e henn emann. Eur wech griet mat e zont gantan, echa en em stummas evit ma ne vije ket anavezet gand mamm ar ramps; trouz'ha a eure e vleo, lakat e eure eur chapen hag eur braon kerneval ha froa a eure mouar ouz e zremm. Die'hizet evelse, e pignas gand ar skeul hag e tigozeuz a-nevez e bro an nerv. Mont a reas war eun da gstell ar ramps hag e c'houllennas digor digand e vamm.

Da genta houman ne fellas ket d'ez entent tra. A Nann, nann, emez, gouzout ran re vat p'ra goust degemer re-querien bro eveldeh-c'houi!

N'eus ket pell, em boa bet trevez ouz em hallion eus rei d'ezan bara ha lojeiz. Her masel em eus hag her c'houez ouz va mab, en dije eun doenn hag evit anavezet-gez vat ez eo roiet kuit en eur gas gantan ar c'haeta eus e dri denzor, eur biniou strobineller a zone d'omp sonio evel ma n'ho peus klevet biskouz. « Of ar fallak, eme Jalm. N'ho peit son ebet, intron vat. Ma tigozeuz gantan, me a ziframmo digantan, a dolou douar, ho i benveg kaer evit henn re-va d'evell. — Doan 'ho po, emez, Setu c'houez' mir zo eman ma mab oc'h e glask dre holl. Ah! ma c'hellec' ha-kat e graban warnan, henn lakafe da rosta a-stribil ouz ar ber. Deut 'ha, met arabad, en em ziskouez d'ar ramps, rak ne c'hell ket gouzvas ar gristenien hag ho glads a rafe dianed e zeul ». Bet a reas d'ezan bara, kig sall ha chistr, hag her chuzaz reas er fourn.



Den goude e tigozeuzas Goulafrus, skuz kenan. « Ne 'm eus ket c'hoaz kavet ma laer, emezan, met kendalc'her a rin. He glask epad kant vloaz ma 'z eo red. Dre c'haens, n'en deus kaset gantan nemet an distera eus ma zri zentoz, hag an drasez em freak eun tammig em zristidigez ». Skarza reas evel ar wech all e varkenennet souleun, e donnell win; tosta! reas ouz an fan hag e c'houllennas: « Mamm, degasit d'in va yar zu, evit ma c'hoarin ganti a-rok kousket ». An hini goz a zegavas ar yar hag henn ha-keas war an dol. Hep tro ma lavare ar ramps: « Ma yarig karek, doze! ar yar a zoze eur vi; he mestr henn tere-hag e koneze dioutan bern-ha-bern, peziou ouz, braougon, meta prestus, glaz, gwer, ru, melon, a lugerine ouz sklerijenn tan un oled, hag ar ramps a en em zidue en eur o lakat da rullu eus an eil doum d'egile. Jalm war c'hoed, dreuz eur faout eus dor ar fourn, a zelle, a zelle. An hini goz 'oa aet kuit; hep dale ar ramps ne finvas mui; e henn a slous war gein ar gadon hag e soubannas mervel. Ar pitr a c'houllennas ken na roch'as, a goutes neuz e doull-kuz, a leunias e c'houllou a aour hag a vragougn hermet war an dol, a dapus peg er yar, a yens er muez didrous, a ziskennas gand ar skeul pevar ha pevar. Digas a reas ar yar d'e vamm gand levezeg hag e reas d'ez dozi dirazi en eur lavare: « Ma yarig karek, doze! eur vi leun eus an hevep tenzor ma oa reus e c'houllou anez. Dre an areval prestus-se, Jalm hag e vamma a deus da veza ar plinvidika eus ar vro. Prens! rejont kalz frouzou hag e rejont sevel eur maner e koad ar Roc'h, gand touzou, moerouza uhel, horzou leun a vleun hag a frouz hag a valiou kaer. Dre ma kreske, Jalm a gomprenas pegon treut 'oa bet e gelennduruz kenta; meza deus d'ezan eus e zintuzigez, eus e zourou rist, hag en devoz ar ganton d'enn em lakat er skol, da zarempred tud fur ha savet mat, kentoc'h eget dispign are'han evit kaout plijadur. En eun nebut blaevout e tenas da veza eur pote youank d'ez, d'ezal ha seven a dije d'an holl hag a rae altronouz kaer d'ar boorien. E vamm a lavare d'ezan alies: « Jalm, ma mab, poent eo d'oc'h fortilia. Me gred e kavfech aes a-



wele'h da zimez. Perak ne gonerfech ket peniterez vourc'houez a veurc'houez ato ouzin en eur dremen, pe merez e d'ezan korvaz, ar vava 'zo er vro? ». « A-rok fortilia, mammi, a responte Jalm, me fell d'in mont da ger'chal frede tenzor ar ramps, pegvir ouz deut a benn eus an diou genta. Beteg neuz, arfad kounz d'in eus eur plac'h youank. Be' c'hellan beza lazet gand ar ramps kounnaret hag e vete doannas lezel aman eur plac'h en he dielou, pe eur wreg intañvez ker buan. Eunn dez, e lakas en e benn, adsevel gand ar skeul trojoun en dou di-fennet d'iskart, beteg an en tu all d'ar c'houmoull.

A-rok e oa en em zic'hizet, ha fizout a rae war an amez dremenet hag ar c'haens digouezet gantan evit ma ne vije ket anavezet gand mamm ar ramps. Digouezet a reas hep romest e kichen ar maner; skel a reas war an nor hag e c'houllennas digor. An hini goz, a reas hep brek muioc'h c'hoaz eget an diou wech kenta: « N'ho eus ket a c'haens o tigenoret alioed deut 'nozer ket eus a belec'h. Unan anez eo deus laeret diwar ma mab e vintou strobineller, egile e yar a zozez v'ho burzidas. Pion ar n'ho peus-c'houi ket eur zoni henve? Abaoe ma mab ne zigouarnas ket: n'eus nemet gvel e drede tenzor a c'hellec' e zistann. Mar ho kavfe en e vamer, ho prun-ful! ». — Jalm en devoz kalz poan o c'houmoull an hini goz. Dont a reas a benn koulskoude: « na oc'h echi deuit, pa zankas kuzat buan er four. Goulafrus! oa o tont en eur c'houmoull hag en eur bech'.

Kavet ho peus ho laeron, a c'houllennas ar vamm. — N'om eus ket c'hoaz, met o c'hallas a rin kement pa ma vzo rei, hag en deiz-se, me hez fon, uhel moun o zi a deuto da veza an izela, hag e veze red lakat luedoulet eul gwelet ar banna lamm a lezin eus o c'haout! » Goude beza debet e zoubenn, hag evel e win, ar ramps a dozeas ouz an fan: « Mamm emezan, degasit d'in ma zrede tenzor, evit ma veze trefnet ma c'hallon o sellel oant ». An hini goz a yens er muez, hag a deus an dro gand eun plac'h youank gwisket e diu, eur gened dispar d'ez, met gand eun dremm doannis. — « Nozev vat d'oc'h, primze, eme ar ramps en eur zere en e zav. Euruz ouz ouz ho kwelet evit ma z'hoaz, perak e oullit'ha d'alc'h-mat? Ha ar c'houmoull ket eurus aman etouez kement all a denzor? »

Pa ho pezo santet alioed gantan, an holl draouze a veza d'oc'h, hag e vezech' al louennas plac'h a vezo. — « Siouaz, emez, ne vezo euruset ebet evidon kenta hez ar eus ma z'ad, gweleoc'h eo ganin mervel m' gwech kentoc'h eget beza gwerz eun trempren eveldeh-c'houi a zehri kig liz. Met gouzout a ran e t'gaso Done en deiz, en den kalonek d'an diframma eus a dre ho skilloz; an drasez hepken a zistann ma fonn. — Pennek oant primze, eme C'houllafrus, met me a vezo ive kement ha c'houi. C'houmoull siou! ar pez a c'houllennas digouezet en abardez-man, eo kemeret ma fenn war ho parlenn, ha kama d'in unan bennag eus ar zontu dudius a ouzuit, betek ma kouskin, rak skuz-maro ouz ». Ar paour keiz plac'h youank a azezas hep klemm, a gonervas war e daulenn penn teo skarbolet ha garo Goul-



frus hag a en em lakeas da vonskana eur zón dous ha melkonius. Hep dale, ar ramps a zerras e zaotlagad hag e en em lakeas da roc'h. Neuz ar brinsez en em denas kontadik hag a lezas penn ar c'houster da goueza eur dorechen. Sellet a ra e dro d'ezha gant dizeper, pa gouezas he sell war zell Jalm en doa buntet dor ar fourn hag, eur biz ganlan war e vuzelloù evi rei d'ezha da entent chom hep lavaret grik, e teuas da gemer he dourin hag e yeas ganti etrezeg an nor. Houman stouas z a ou premet, ha daoust d'ezan d'ober eus e wella, Jalm ne c'hellas ket he digori hep ober trouz. Eur wech er-maez e c'hasas ganlan ar brinsez en eur redag betek ar skoul. A-boon oa digouezet warni an daou deo'hour ma klevjont eun trouz spontus ha garmoni skrijus. Goul-

frus eo a oa dihanet hag a rede war o lerc'h. Klask a reas diskenn ive gand ar skoul; met re vresk ' oa evit harpa pouez ker pounner; ar ronll n'ten doa ket diskennet dok pazenn ma torras ar skoul. Koueza 'reus en eul lezel eur vlejostenn spontus hag e teuas d'en em vresi war reier ar menez. Jalm hag e brinsez n'hen heuiljont ket pa gouezas, rak traon ar skoul en doa harzet hag e c'helljont diskenn d'an douar hep kaout droug. Ar brinsez a oa maro he zad gand ar c'hlaohars, a zantus, a ganton vat, beza gwreg he Salver. Eun eured kaer a voe graet. Tadig ma zad kunv a voe pedet, ha dreizan eo ec'h anavezomp a rumm da rumm en hor familh istor tri denoz ar ramps Goulstrus.

G. K. P.

Kenteliou war al labour=douar⁽¹⁾

Kenta krevrenn : an douar hag ar binviachou

I. — AN DOUAR

Kement louzaotenn a welomp o sevel en dro d'eomp a gav, en douar ma fetont da zionan ennan, ar vager durez hag an dour o deus ezomm evit heva.

An douar ne c'hell ket beza douar mat evid an trevajou a zav ennan nemet tri dra a vefe ouz hen ober: pri, lreiz ha raz.

Ma 'z eus oc'h ober an douar re a bri, diouz an lreiz hag ar raz a zo ennan, an douar a zo douar pounner; ma 'z eus muioc'h a drez, eged a draou all, eo douar skanv; ma 'z eus muioc'h a raz eo douar razok, E Breiz n'eo ket stank an douar razok.

An tri seurt davez a ya da ober eun tamm douar mat o deus pep hini e dalvoudgez: ar pri a ro korf d'an douar hag a laka anezan da zere'hel dour a-walc'h epad ar zee'hor; an lreiz a vir outan da veza re gallet en hanv ha re c'hleber er goanv; ar raz a vag an trevajou hag a zo mat da lakat an teil da vreina.

An douar fetis.

An douar fetis, pe mar d'eo gwel ganeoc'h an douar mat, eo an hini a zo ennan a-walc'h a bep danvez, pri, lreiz ha raz; arabad e vefe re, a-walc'h ha netra ken; ar gwiniz, an heiz, ar c'herc'h, ar rabez, ar panez, ar melchen hag all a blij an douar-ze d'ezo hag a ro ennan costou founnus; melen-du eo e liou.

Al louzeier a zav ennan, heb ezomm d'eo hada; kaout a raer eharz melchen ar vro, melchen douar, geot Pariz, geot gall, teol, louzon an teil, treuz-geot, troell. Evit barn talvoudgez eur peziad douar, gwella tra a zo da ober eo sellet piz ouz al louzeier a zav ennan anezo o-man.

An douar priek.

Pa vez re a bri en douar e vez diesoc'h da labourat kement e sanker ennan ha pa vez glao e chom an dour da boullada warnan. Er bloaveziou glec'hor an trevajou ennan a deu da vreina; an douar-ze, koulskoude, a zo mat evid ar gwiniz, ar panez hag ar melchen. Alies avat e vefe talvoudus ober foenneier se'h ganlan en eur hada ennan geot kemmesket evel a livin pelloc'h.

An teil fresk ha plouzek eo an tremp gwella evid an douar-ze.

(1) Ar c'houstion-man, savet ma 'z lit gand eun euzelour arvroenn e hag eo deus graet e studi e skoula bras al labour reter douar, a vezo talvoudus kenan d'an darn vrasa eus holl lennerien.

An douar trezek.

Pa 'z eus re a drez en douar eo aes tre da labourat met en hanv e teu da veza evel ludu hag e varz an trevajou ennan gand ar zee'bed; an douar-ze a varz du.

Drez, jann, balan ha trichin fogod a en em blij ennan. Ma kemeril eun dourmad anezan e vruzano dioc'hitu etre ho taouarn. An douar skanv-ze ne blij ket d'ar gwiniz, na d'ar panez, na d'ar rabez, na d'ar melchen; an ed tu avat, ar garotez, ar ruta, ar segal hag ar c'herc'h a deu bras ennan; fall eo an teil da vreina; red eo e drempa eta gand teil breinet mat.

An douar razek.

Dibaot eo kaout douar evelse e Breiz-Izel; fall eo alies, mat hepken da lakat melchen ruz-wenn (sain-foin) segal ha geot. Er broioz tomm, ar gwiniennon a deu bras bras en douar-ze hag a ro gwin mat.

II. — AR BINVIACHOU LABOUR

Evit kaout trevad, kenta tra a zo da ober eo arat an douar. Lavaromp eta eur ger hennak diwarbenn an eler.

Alar ar Vro.

An alar e labourer ganlan e Breiz-Izel a zo eun alar eus ar re wella; skanv eo d'an dud ha d'al loened; ober a ra labour vat meurhed pa vez blienet gand eun den gonest; heuliet gand eun tumber e ra eul labour dreist; ne dalv ket ar boan mont d'ar broioz all da glask eul labour graet gwelloc'h, rak n'am eus ket gwel e nep lec'h.

A-wechou koulskoude e vez bresk tamm pe damm anezan; eun dra vat e vefe, a gredan, ober e dir an tammou anezan hag a zo e houarn garo (fonte).

Alar Brabant.

E Bro-Vrabant, er Beljik, eo bet ijinet an alar-ze. Eun alar mat eo; n'eo ket red beza koulz labourer ha gand an eler all evid ober labour vat ganlan.

Gwella Brabant a gavan eo an hini en deus daou wignalar (1) hag e c'heller trei ganlan an holl vromm diouz an hevelep tu, hep hoz ebet.

(1) Wignalar e versoir.

N'eo ket re skuzus an alar-ze nag evid an dud nag evid al loened. Daou loen hag a zo boaz a jach anezan hag a-walc'h eo eun den d'e vlenia.

Ne ra ket koulz labour hag alar ar vro heuliet gand eun tumber met gwelloc'h labour a ra eged alar ar vro e-unan.

Mat eo ar Brabant d'ober labour huan ha kempenn pa c'houstaer trei hep douar. Bez ez eus eur Brabant all hag a dro daou vromm war eun taol. En eur jench ar souc'h hag en eur lakat eur souc'h tumber, en e lec'h, e c'heller trei ha douara war an hevelep tro.

Me ne blij ket kalz an eler-ze d'in; re bouner ha re zistrantel int da ober labour doun.

Talvoudus eo, en eun tiegez mat, kaout, ouspenn an alar hag an tumber, eur brabant daou wignalar.

Ar treuziou pe an ogejou.

Gwel eo ganen ar treuziou houarn penn-da-benn; labour velloc'h a reont eged ar treuziou koulz gand dent houarn. An ogejou pounner a ra labour velloc'h ha dounoc'h eged an ogejou skanv. Koulskoude mat eo kaout daou re ogejou, eur re bouner hag eur re skanv.

An diframmerez.

Setu eur henveg (extripoteur e galleg) ha n'eus ket anezan c'hoaz e pep tiegez ha koulskoude eo talvoudus kenan. Hei lakat a raer da vruzana ar poutoud war-lerc'h an alar, ar peza a zo talvoudek kenan a-raok gounit rabez, karotez, ruta, gwiniz du hag all.

Implijet e vez goude an cost da zilasleza an douar, rak diframma a ra eus an douar, ne vez ket pell, ar gwinizou treuz-c'heol, troell hag all a vez devet goudeze gand an heol; douara a ra hajou al louzeier fall kouezet d'an douar epad an hanv; diouan a reont, met hazet e vezont d'lo goudeze pa vez troet an douar.

Ar C'hran pe ar rollouer.

Talvoudus eo krana (pe rollouer) an douar. Gwel-laet e vez kalz an douarour skanv gand al labour-ze.

Goude pep gouidegez, eun taol kran a start an douar war an had a zionan kalz gwelloc'h goudeze; aeso'c'h eo ivez c'houstenn an douarour kranet rak bruzinet gwelloc'h eo o gorre. Pa vezer o vedi e douarour kranet e c'heller trouc'ha tostoc'h d'an douar ha dre-ze kaout muioc'h a golo.

Gwelloc'h eo ar c'hranou houarn pe houarn garo eged ar re e maen pe e koat. Koustout a reont keroc'h, gwir eo, met n'int ket ker bresk hag o labour a zo atao gwelloc'h rak an douar, pa vez kaotet, ne spig ket outo kement.

Eur c'hran all, ar « C'hraskill » (ger saonek) pe ar c'hran danteq, a zo mat kenan ivez da vruzana an douar; evel rastellet e vez eur park kranet gand ar henveg-ze; eur souez eo!

Breman p'hou eus lavaret eur ger hennak diwarbenn an douar hag ar binviachou d'e labourat e komzimp, er wech kenta, eus an tu d'e wellaot, da lavaret eo diwarbenn an tremp hag ar peuz-tremp (amendements).

OLIER CHEVILLOTTE.



Tra vat da c'houzout. — Kement hini en deus c'hoant da gant sklerjienn, war ar peza a Zell ouz e diegez pe ouz al labour-douar, n'en deus nemet skriva da :

M. le Directeur du « Feiz ha Breiz », Plouguerneau, Finistère.

diskleria traes e c'houllenn hag e adres ha lakat 4 dimbr a 10 gwenneq, en e lizer, evit mizou ar respont.



enno evito. N'eo eus kement a gasoni eneb ar Jezuzied, nemet vire ma labourer kement evad an Hiz. Ar gozhannehou ar deourontou kement evad an Hiz, en eur en ein zizober anezo en eur mare fall, n'ho deus ket siouret ha embouhenn, hag ho deus kollet he gwella soudardel. Hogen, pa e'halvas anezo en dro, ar Pab a ouie e'halve gwella servicherien an Aviel, hag e'eheset kalonka.

Milken Gompagnenez-Jezuz, hor pevar merzaz a zo d'omp evlato vire o gimivez hag ivez dre m'o deus labourer er vro amañ.

An Den-Eurus Gladia LAPORTE, ganet e Brest, d'ar 6 a viz Kerzu 1734, eo bet dreist-holl eur beleg-parrez, daoust ma vee bet kaset da genta dia skolaer gand e renerien. De 19 vloaz e oa er Gompagnenez; edo o leski ar rhetorik d'ar vuzale e Orleans, er bloavez 1762, pa vee laoiel ar Gompagnenez d'an traon, e Frans. Dont a reas da studia an theoloji da Gastell-Paol. Dindan bloaz e vee roet d'ezan an holl urzioù, ha bloaz goude e vee beleget e niz gweringo, e Kemper. Kaset e vee da Zant-Louis-Brest, ha karget eus « Breurtez ar Vichecourien ». Epad tri bloaz ez eas da greisteiz ar Frans, da Sant-Papou, e kichen unan eus e c'hoarezed dimezet. Pa deus andro e vee karget eus a skol ar vartolodid. Pa vee sarret ar skol-ze er bloaz 1786, e vee kamet da vleg-sakrist e Zant-Louis, ha goude kure kenta. Na'ch a reas, evel e berson hag an darn vria eus e genvreder, senti ouz Reolenn Iark ar velenen. Ar person, an Ab. Moëh, a renkas teohout da Vro-Zaoz. Dirak ar beleg loue, Gladia Laporte en em gavas e-unan pastor gwerion ar barrez. Dre urz ar mear, e vee prizoniñ e Karmez Brest gant 80 beleg all, st'ant 28 a viz mezeven 1791. Lezet da vont kuit d'an 23 a wengolo ha kuzet e Gwitalveze, edo warnez beza paket adarre e niz kerzu, pa generas henn Paris, d'ar 17 a viz Eost 1792, e vee tapet k'wez emañ. Prizoniet e kement karmez, e vee lazet eno d'an 2 a viz gwegenol 1792.

N'annavezomp ket doare e varo. Evel ar re-all, e bremaes dirak an torfeolour Mailhard, troet da varnez, ha kerket ma vee gwelet p'hou e oa, e vee lazet gant ar venterien.

Mistri ar mare-ze ne bardont ket da Chilaoda Laporte e merz-kalon. E gessal e c'helljont, met nann e zismogans. Dirag ar gourdrouz, ar prizon, an dienez, ar gwali-gouzou e chomas bepred divral. An ofereñ hag ar brevier a vee a-walc'h evit e gennerezi. Pedi a reas evit an ennoù pewir ne c'halle ket labourer en o zotez. E Pariz zoken edo atao e zont enno. Kas a reas d'e bardinioz a Zant-Louis e wella adiou divar-benn ar verzerenti, o displega d'ezo fræs petra da ober e kener ar velenen o dia touet, o'ch alia anezo da vont an alisa ar gwella daved ar velenen fidel, o leski d'ezo penaos santelañ ar zui pa n'ellere ket kaout ofereñ, ha penaos kendeleher dia zervichia Doue petra bemg n'o doa ket kou o bolien, evel kristenien ar misionon ne wolent ket atao o misioner eur wech ar bloaz.

Eur beleg hag a zo atao evlenn en e spered ar pez a zell ouz an ennoù ha gior an Aotrou Done, a zo emañ d'arvez eur Person Ars.

Ar verzerenti e d'empel Karmez a vee evit Gladia Laporte ar gurunenn d'ed d'e vuzez santel a vleg-parrez. An Den-Eurus **Yaent al LIVEC a DREZURIN**, a oa bet tapet e Pariz, er mevez H gant Gladia Laporte, ha kaset da prizon ar Force epad ma taolet e genvreuz e prizon Karmez.

Rinnig a rafomp ar beleg santel-ze da skouder d'ar vistris-skol kristen. Ganet e Kemper d'ar 5 a viz mae 1726, ha badezet en Iliz-veur, H. al Livec a oa ar c'hosa edo pennez krouadur mont a reas evel kloureg en urs ar Jezuzied e 1741. Kerket hag ar bloavez 1743 e vee hanvet da vestr-skol e skolañ Amiens, ha goudeze e Pariz hag e Gwened.

Kaset e vee da c'honde da Vrest, da gioridi Armonien ar vartolodid. Dan ampoent, an Urz a oa taolet d'an traon e Bro-Chall, hag ar beleg santel a c'houlenas mont da eur skol en eur vro bemg hag e vefe lazet emni ar frankiz gant an Urz; hanvet e vee da zesk ar skolegion da g'wez Fuld en Alamagn, beteg an doiz ma vee torret, an Urz gant ar Pab eno ivez.

E gavout a reer neuze en hospital Tours, el lec'h ma chomas em nebenn miziu evel aumonier, ha goudeze evel beleg fibr e Kastell ar Bourdonnaye, e kichen Ploermel. Eno eskob Gwened a deuas d'e gerc'hat evit prezeg eur retret gouezet.

Erin e Pariz e vee hanvet da aumonier e kount leanezed Urz Sant-Beneat, ha da gozour Prinez Lamfal. Eur beleg hag a wel a-raok pep tra eno ar vuzale a zo gant an skol, eur beleg hag a glask da genta, dre e gentelion, brasa gior Done, ar beleg-see a zo var hent ar zantelez, var an hent da veritout beza lakat war roll ar Zent.

An Den Eurus al Livec a vee eur c'helenner dispar. E Pariz ne oa nemet m'evloution da rei dezan evit e zeskadurez, e galon-val, e vertuzioù hag ar fizians o doa an dud emañ. Ne ouzomp netra muio'ch divar-benn e vuzez. Ne ouzomp netra muio'ch divar-benn e vuzez. Ne ouzomp netra muio'ch divar-benn e vuzez. Ne ouzomp netra muio'ch divar-benn e vuzez.

Er meze kristen ewlenn hag a oar deski o dever d'e ziskibien, a die ivez rei d'ezo ar skouer; ha'ne warc'hato ket ma ten eun devez eur gouarnamant da rei d'ezan urzioù a enep e goustians. Senti a ray atao kentoc'h ouz Doue eged ouz an dud ha pa rank'e evit se koll e vuzez. Ewele e varvas an Den Eurus al Livec, e prizon ar Force. Ha zeñ e zekris da rei merz-kalon d'hor mistri kristen evit delcher start d'o spered a foiz ha da bouza ar gerc'hat da c'houñt evit o skolon ar frankiz hag an dienez.

An daou Zen Eurus **Visant ROUSSEAU a ROSENOAT** e **Nikolas VERRON**, o deus en em zantelañ dreist-holl e reas an ennoù er c'houmbouh hag er reterioù, d'ar mare m'edo an Dispac'h o lakañ ar verez hag al leanezed da zibab etre na'ch o foiz pe beza taolet d'ar maro.

Visant Rousseau a vee da genta mestr-kelbenn. Ganet e Kastell-Nevez ar Faon d'an 3 a viz gouere 1736, e reas e studi o skolaer ar Jezuzied e Kemper. Kloureg eus an Urs d'o 17 vloaz, e vee hanvet goudeze da vestr-skol e Arras, e Kemper hag e Nevers.

Goude beza bet epad bloaz e penn reterioù gouezet, e Kemper, e reas, pa vee torret an Urz, da vosa gant e vamm d'ar Chastell-Nevez, ha goudeze da di e vestr da Gempelle. Er bloavez 1774 edo rener kount Ursulinnez Karmez. An aotrou n Eskop a Zant-Luk a gavo amezan eur beleg dispar e pep ziz. E 1789 e vee hanvet da aumonier Seurezed ar Visitation, rue du Bac, e Pariz. Eno e vevas e peoc'h, pell diouz trouz ar bed, ha den ne zour e deurel er prizon. Tapet e vee koulskoude, dre fañ, kaset da Garmez ha merzieret ivez evit e genvreder.

Nikolas-Mari VERRON a vee ganet e Kemper d'ar 17 a viz m' 1740, ha badezet en Iliz Sant-Kolomban.

D'e 17 vloaz e oa kloureg; d'e 19, mestr-kelbenn e skolañ-bras Louis-le-Grand e Pariz. Pa vee torret e Urz, e vee karget eus kount Santez-Aura. Sevel a reas eno an « Adorasion penobadus ». Leanezed a vee noz-oiz o'ch adon ar Galon-Zakr e sakramant an Aoter. Kals prezegeñnoù, kals reterioù a reas, o pouiza al leanezed da gommunia alies ha da skigma en dro d'ezo an devozion da Gaion dinann ar Werc'hez Vari, ha da Galon-Zakr Jezuz.

An dud diroll hag ar Jansenisted a zavas holl a-enep d'ezan. Beleg rener e gount, an ao. Gristel, a vee taolet er Bastill epad 18 miz; ne vee ket amez golllet avad, rak zouni a eure da Jezuz-Krist ar re a oa ouz e zivall. Epad an amzer-ze an Tad Verron a zifenne, e-unan, an Urs, hep ehana da zikour e leanezed d'en em zantelañ. Lavret a reas d'ezo: « War an douer ar pez a zo an henvel ouz an Nenv, eo an adorasion hep distag ». En e ziveza prezegeñnoù d'ar c'henta a viz gouere 1792 e c'halle lavaret ne oa chomet m'orse an Urz Sakr hep unan bemg d'he adon, ha kementse en despet da heskinerezh an Dispac'h.

Daou viz ha daou zever goude o oa merzieret. Taolet e vee e prizon Sant-Firmin d'an 18 a viz eost, ha d'an 3 a wengolo e vee lazet dre gasoni evit ar feiz, d'an oad a 51 bloaz.

Berniou traou chomet eus a zilerch an Amerikaned, ar C'hallaoued hag ar Zaouz
Bouteler, dilhajoù, mezer, lien, menil, gweison, pallennoù, linsellou, golo-hejioù, matalasennou, hag all.
Ar vurchadurez a brener a vezo kaset d'lec'h d'ho stêr.
TI LE CORRE
an ti a zo o'ch o'her koun etre ar ra bravaad hag ar ru Vietor-Hugo, harp ouz Iliz Sant-Mikael VREST.

Exit beza asuret mat en em adresit d'ar Gompagnenez **LE NORD**
evit hoc'h oll asuransou (ar vuze, an tan, an accidentoù, hag all).
HOUCHE-PILLON ha LE GALL, 1, rue Vietor-Hugo, BREST, e koun er Paris.
(Kount e bez brezoneg).

C. REMY Téléph. 6-65
68 ha 132, rue Jean-Jaurès - BREST
Medisina enor e Diskouradeg e Arre Decembre 1925
Labouradeg Pezion-arrebeuri prent-fetis
Arrebeuri giz-Vreiz, giz Lociz XVI ha giz-vreman
Kambchou-gweleou - Salou-dibri
Gweleou houars ha koevez, dilhad gwele, melzeourioù
Gleoz matalasennou, Plane ha dave
Prizos ar gwella marchad
An dud diwar ar maez a vezo digemeret eus ar gwella.

Klanvourien !
An efedusa eus al louzeier da grenvaat ha da burraat ar gwad eo al louzou diwar lodmor ha raz-eskern. Hogen eus an holl louzeier diwar lodmor ha raz-eskern — stank an niver anez — ar reisa hag an efedusa eskern fresk eo, hep mar a-wel d'an holl, an **ULMINUCINE MOREUL**, al louzou galoude-greist, anavezet dre-holl e Breiz hag en deus saveteet kement a vuzezioù prizius.
Mammou tiegezh, ha d'eo'ch hugale blienk, disliw, fall da grenvaat ha diwezat da greski, pe merched diaes d'ezo dont d'o oad-krenn.
Maouezed digouezet gant tro an oad, na droiañ ket da geman an **ULMINUCINE MOREUL**, aozel gant an D' en Apotikerezh Th. MOREUL, torret gant Akademi ar Madecsinerezh, ar pez a ro testennoù e o'uziegezh. Kasit ho kwad, ho skopadennou, ho troaz d'ar **Grande Pharmacie MOREUL, Landerne.**

AUX **DAMES DE FRANCE**
95, 97, 99, Straed Siam, BREST
BRASA STALIOU ER VRO
NEVEZIOU - DIANKACHOU-TIEGEZ
ARREBEURI - TRAOUACHOU PARIZ
Ar wella marchadurez evit an izela priz
Ar marc'hadurez prenet a vezo kaset betek ho ti gant kerri dre dan.
Tud an ti a oar Brezoneg

(HERNACH) Quincaillerie GUIAVARCH
45, stradae Louis-Pasteur - BREST
Eun dibab bras a fournezioù hag a ziankachou-tiegezh eus ar gwella merkou
Kouezerezh ha pothouarnioù saoz
Biniachou labour-donar ha lortzer
Bintion evit an holl eicherioù
SKLERIENNEREZ - LETERNOU KIRRI - PALLENOU LINOLEUM
MALIOU - MALETENNOU - PALLENOU
Stal-veza ha barez : 45, stradae Louis-Pasteur, 5, stradae Saffroy
Kabinere - 46, stradae Louis-Pasteur, 2, 3, 4, 5, stradae Saffroy
Eguezaman - Zinc ar VIEILLE MONTAGNE

Hadou potach ha brouskou, hadou bleunioù
Hadou dibadet eus ar gwella tiez
TI A. HUON
Savet e 1840
L. AUDREN, DEUT WAR E LERC'H
17, Straed Siam - BREST
Téléph. AUDREN-GRAINES-BREST Téléph. 5-35
BINVIOU - PESKETA
KERDIN - SIFELL A BEP SEURD
Brezoneg en ti **TI A FIZIANS** R. C. Brez 49

Tanijenn ar c'houadurien nevez-c'hanet
ha Skalf ar Bronnou
a vez paret naet gant ar
POMMÉ NOËLLINE
HA POUËRE
e ti an apotikarian ha Lab. Noëlline, 75, stradae Siam, Brest



Feiz ha Breiz a zo pevar real ar pez
BREST, MOULEREZ AR SKRIDOU MAT, 4, STRAET AR C'HASTELL

